

**b**rennñ



**Breizh  
2010**

**4 a viz Here • Roazhon**

**Lizhiri ha kemennadennoù**



ltron Renezes,

Dizoloet em eus ho kazetenn dre zegouezh hag he lennet em eus gant plijadur. Plijout a rafe din neuze bezañ kourmantet da v-Bremañ, ha setu ma kasan deoc'h ur chekenn a zoou c'hant lur.

Daoust ma vevan e Prouvenç abaoe dek vloazh ha daoust m'am eus kejet gant ur bern Bretoned amañ, biskoazh n'em eus bet tro da gomz brezhoneg abaoe pell hag en em santout a ran muioc'h-muiañ divri-zienet hag iskis!

Ma anavezit brezhonegerien dre amañ, mar-plij kasit dezho va chomlec'h. Trugarez!

Marie Ghaoui, Nowhere Land, Capitainerie du Port 83400 HYERES - Okitania

Intron, Aotrou.

Karout a rafe bout adkourmantet d'ho kazetenn a reseven bep miz ingal abaoe ur blez d'ho, (...)

Setu ur chekenn barennet a 250 lur eid skoazell ac'hanoc'h un tammig, daoust n'am eus ket kement amzer da lenn get va labour, siwazh. Ezel on a «Ti ar Brezhoneg» e Pariz. Va zigarezit eid an nebeud faziennoù, neuze, met e vakansoù emaan. Get va gwellañ gouic'hemmenoù.

J. Yves LEROY (Pariz - Frañs)

**KINNIG-LABOUR**

An deskadurezh o klask ur c'helenner brezhoneg

Emañ an deskadurezh Stad o klask ur c'helenner brezhoneg d'ober skol e lise Aire (Bro-Wened), adalek ar c'hentañ a viz Here betek an 21 a viz Kerzu 1997, tra ma vo ar c'helenner entitlet o heuliañ ur staj. Evit kaout titouroù all, pellgomz da d/Tugdual Kalvez : 02 97 45 45 17. Evit en em ginnig, skrivañ da Rektori Roazhon, 96 straed Entraven (Antrain) - 35044 Roazhon.

**Bloavezh 1997-1998**

**KENTEIOU-NOZ SKOL AN EMSAV ROAZHON**

Skol Vrezhoneg e kreizenn Skol an Emsav a vo adalek miz Here e Roazhon evit an dud deuet, 14 kentel, 2 eurvezh ar sizhun (live 1 da 4). Prezegenoù bep miz war Istor Breizh e galleg. Dibenoù sizhun studi. Titour : 02 99 38 75 83

**GAC LANDERNE**

Kinnig a ra ar G.A.C. (Groupement d'Action Culturelle) evel bep bloaz kentelioù brezhoneg.

Er bloaz-mañ e vo dalc'het an traoub er moda-mañ : Live 1 da 4 ha C'hoariva e brezhoneg evit ar vugale.

Kregiñ a ralo ar c'hentelioù d'al Lun 29 a viz Gwengolo. An enskrivadennoù a vo kemeret adalek an 2 a viz Gwengolo. Tu a zo deoc'h pellgomz evit kaout titouroù all.

G.A.C., Hent-dall Jehan Bazin - 29800 LANDERNE  
Pgz : 02 98 21 61 50 Plr : 02 98 85 09 59

**KREIZENN SEVENADUREL VREZHON «ROPARZ HEMON»**

- Kentelioù brezhoneg : priz evit ar bloaz : 500 lur (studierien, tud dilabour 300 lur), live 1 betek al live 5.

- Kentelioù kembraeg

- Kentelioù dañs evit an oadourien.

Evit ar vugale 6-12 vloaz

- Kentelioù dañs.

- Deskiñ brezhoneg dre c'hoarioù : priz evit ar bloaz : 160 lur evit 1 bugel + 130 lur dre vugel evit 2 hag ouzhpenn.

- Labour dre dorn.

- Levraoueg.

Holl oberezhioù : 700 lur evit ar bloaz.

Emvod distro ar greizenn : D'ar Meurzh 09/09/97 da 8h/2 noz, digor d'an holl.

**TI AR VRO KARAEZ**

Skol vrezhoneg gant Spred ar Yezh

I. Skol noz d'an dud vras : 30 kentel e-pad ar bloaz, etre 8e30 ha 10e, 3 strollad gant 3 c'hefluskour.

II. Staj d'an deraouidi : 3 dibenn-sizhun brezhoneg d'ar pevarlamm, gant 6 kelenner bep dibenn-sizhun.

III. Staj «Komz Brezhoneg» :

Dre strolladoù bihan 4-5 den.

IV. Devezhioù «Brezhoneg-Kar-ha-Diskan-Dañs» : Studiet e vo ar yezh, desket kanañ ha dañsal.

SPERED AR YEZH, kerouer, 29270 SANT-HERN Plg/Plr : 02 98 99 58 55

**Guy Hervé du Penhoat Yves Guégan NOTERED**

21 - 23 plasenn Kornig B.P 81 - 29202 Montroulez cedex  
Pgz : 02.98.88.00.99. - Plr : 02.98.63.27.77



Da werzhañ : er Fouilhez, un ti war daou sollderadur : e rez-an-douar, karredi, kegin, predva, privezioù, strinkadell, er sollderadur, 3 c'hamb, kibellva da aozañ. Grignol. Ti savet mat a c'haller brasaat. Liorzh gant gwez. Gwedeza kaer war Menez-Are.D83880

**LENNET E-PAD AN HAÏV**

- e-barzh Ouest-France: «la danse plin, typiquement costarmoricaine».

A-hervez ez eus ivez tud a gomz zoken un trefodach «typiquement costarmoricain». Al sotonil dibarded wesfransat!


- e Libération: «Annie Ebrel, et son groupe Dibben (sic) ... interprète des poèmes de Ropar Simmons (sic) et des compositions de l'Ecossais Diarmuid Johnson». Evit ur gazetennerez gant lunedoù parizian, Skos pe lwerzhon zo memes bro, pa ne gomzer ket galleg eno.

- en Egin (6 Eost), kazetenn Herri Batasuna, ez eus bet kaoz eus lazhadeg Sant Dider «...cerca de Rennes, en el noroeste frances...» E Bro Ouest-France eta. Egin avat zo ur gazetenn eus an «nordeste español» a vez lennet tammoù er «suroeste frances».

- en Ouest-France, ur pennad gant ar rener meur, François-Régis Hutin (16-17 Eost) «Reconnaitre les sauveurs du patrimoine». Arabat bout nec'het: ne gomz nemet eus peulvanoù, chapelioù, kalvarioù ha bigi kozh. Yezh ar re o deus savet ar monumantoù-se n'eo ket ur «mad legadet gant an hendadoù». Nemet ar galleg e ve, evel-just.

M.K.

**Taolenn**



**AR GALLEG EO YEZH AR REPUBLIK**  
Sed ar pezh en doa adlavaret Jean-Pierre Chevènement, Ministr an Diabarzh, e Korsika e penn kentañ an hañv, pa oa bet Korsikiz o klask lakaat ar gaoz gantañ war statud ar c'horseg er vro ha nac'haden ar Stad C'hall da sinañ Karta Kuzul Europa evit ar yezhoù bihanniver. «Kas war-raok kelenn ar c'horseg» a c'heller, «gant ma ne vo ket dre ret», eme ar Ministr, anavezet evit e vennozhioù strizhvroadelour, met «ar galleg eo yezh ar Republik».

**KARTA EUROPA AR YEZHOU**

Eus ar promesaoù d'ar fedoù

E-kerzh e emvod diwezhañ bet dalc'het e Douarnenez d'ar Sadorn 23 a viz Eost ez eus bet divizet gant Komite Breizh Karta Europa penaos stourm evit degas skoazell war dachenn kaout ur statud d'ar brezhoneg ha d'ar yezhoù all, d'an deputeuz nevez dilennet hag o deus embannet bezañ memmet evit lakaat ar gouarnamant da siñhañ ha da votiñ Karta Europa ar yezhoù Rannvro pe Minorelaet.



Nevez zo ez eus bet embannet gant Kofi Yamgnane e vefe savet ur strollad labour war ar yezhoù ha sevenadurioù-rannvro e kamb ar deputeuz, se diwar e intrudu, hini Yvon Abiven, ha un depute eus Katalonia. Mard eo bet degemeret mat kement-se e c'hortoz Komite Breizh Karta Europa e kinnigfe ar strollad labour kinnigoù sklaer da vezañ votet gant ar parlamant a-benn reiñ ur gwir statud d'hoñ yezhoù.

**Miz Du e Brest**

Goulenn a ra Komite Breizh Karta Europa digant an dilennidi hag an dud e karg er strollad sokialour e vefe studiet Karta Europa e-kerzh kendalc'h ar strollad hag a vo dalc'het e Brest e-dibenn miz Du. Ouzhpenn-se e vo goulennet un emgav gant L. Jospin, kentañ ministr, a-gevret gant komiteoù all Bro-C'hall.

A.V.C.

4/5

2010 - prederiñ ha labourat evit dazont hor yezh hag hor sevenadur



6/7/8

5000 antre ouzhpenn e Gouel Filmoù Douarnenez. Filmoù Breizh loreet



14/15

Kanol Panama o cheñch perc'henn



16

Goude bro Afganistan, merc'hed bro Iran en arvar eus o buhez



Renerez Bremañ : Lena Louam - Skipañh - Olier ar Mogn - Iwan Kadored - Herve ar Bihan - Tangi Manach, Herve Kerran, Mich Boyer, Sekretouriezh Nadine Engelvin - Luc'heudevennoù gant Lena Louam, Louis Blouche, Amzer Nevez - Tresadennoù gant Malo Louam - Kartennoù Thierry Gauthier  
Ar pennadoù embannet ne engouestont nemet ar re o deus o skriveñ - Kourmant bloaz : 200 lur - Skoazell adalek 250 lur Etreten 250 lur  
Bremañ 8, ru Hoche - 35000 ROAZHON - BREIZH - Pgz 02 99 38 75 83 Plr 02 99 63 82 28 - Niverenn CPPAP 62974 -  
Moulet e ti Moulerezh al Lisoù ROAZHON Breizh - Filmoù gant likon - makitenn gant Lena Louam - golo gant Loïc Schwartz 09/97

xxvet deiz-ha-bloaz

# Breizh 2010

## Peseurt sevenadur evit Breizh en XXI<sup>vet</sup> kantved ?

Sed ar goulenn a vo savet da-geñver un dolpadeg

kenaozet gant Kuzul Sevenadurel Breizh, Skol-Uhel ar Vro

hag Amsez Teknikel ar Rannvro, e Roazhon d'ar 4 a viz

Here. Lidañ 20 vloaz Karta sevenadurel Breizh, prederiañ


war an dazont a fell dimp reiñ da yezh ha da sevenadur

Breizh hag ober kinnigoù d'hon dilennidi e vo palioù ar

vodadeg-se.



O kas an emvod preder ha labour war-raok (a-geiz da zehou) : Bernez an Nal, Naig ar Gars (prezidantiz ar bodad deskadurezh o renta kont deus al labour), Yvong Gicquel, Jean-Louis Latour, Pierre le Treut, Per Denez



Ugent vloaz 'zo, e 1977, e oa bet grataet da Vreizh ur «Garta sevenadurel» gant gouarnamant gall ar mare-se. Gant ar Garta sevenadurel-se e oa bet krouet frammoù zo anezho c'hoazh hiziv : Kuzul Sevenadurel Breizh (Conseil Culturel de Bretagne), Skol-Uhel ar Vro (Institut Culturel de Bretagne) hag Amsez Teknikel ar Rannvro (Agence Technique Régionale); ha diwar ar mare-se e oa bet sikouret un tamm yezh ha sevenadur Breizh gant ar Rannvro ha gant ar Stad. Soñjet o deus renerien an tri aozadur en em vodañ evit lidañ o deiz-ha-bloaz, met ivez evit prederiañ a-gevret war an ezhommoù zo bremañ gant yezh ha sevenadur Breizh. Eus peseurt binvioù o do ezhomm ar Vretoned evit kas war-raok o yezh hag o sevenadur er 15 vloaz zo o tont ? Petra a zlefe ober dilennidi ar strollegezhioù lec'hel (rannvroioù, departamantoù, kêrioù) evit ma c'halle ar yezh hag ar sevenadur-se bezañ en o bleuñv ?

Evit magañ ar preder-se e oa bet bodet tud, diwar intrudu Kuzul Sevenadurel Breizh, Skol-uhel ar Vro hag Amsez Teknikel ar Rannvro, ur wech e miz Mezheven hag ur wech al adarre d'an 30 a viz Eost e Plañvour, da labourat a-gevret war 6 kraf : deskadurezh, media, krouiñ hag ar, embregerezh ha sevenadurezh, endro ha glad, buhez foran hag aveadur. Diwar al labourioù-se e teuy ur skrid a vo kinniget d'ar 4 a viz Here e Roazhon. Ennañ e vo kavet un toullad kinnigoù graet gant an «Emsav sevenadurel» da zilennidi ar vro, hag emichañs e teuy ar c'hinnigoù-se da vezañ danvez kaozeadegoù etrezo. Lakaet e voe war wel da skouer, e Plañvour, binvioù ret evit ma c'halle yezh ha sevenadur ar vro bleuniañ en amzer da zont : krefivaat ar frammoù zo bremañ



an dud bodet evit rentaa-kont ar bodadoù labour e ti Amzer Nevez e Plañvour d'ar Sul 31 a viz Eost

evel Kuzul Sevenadurel Breizh, Skol-Uhel ar Vro pe Servij ar Brezhoneg, krouiñ buan ur servij skinwel brezhonek evit Breizh, krouiñ un «Arselva ar brezhoneg» evit sellet a-dost ouzh stad ar yezh, aozañ «darvoudoù sevenadurel» evel da skouer lidañ gouel Sant Erwan, astenn kelenn ar brezhoneg ha kelenn dre ar brezhoneg e Breizh a-bezh, lakaat kelenn istor Breizh, startaat hon darempredoù gant ar broioù keltiek tramor...

Digor e vo devezh ar 4 a viz Here d'an holl dud a labour evit ar brezhoneg hag evit sevenadur ar vro ha fellout a ra d'an aozerien e vefemp niverus en deiz-se o tiskouez hor youl da gas hor yezh hag hor sevenadur war-raok er XXI<sup>vet</sup> kantved.

Evit gouzout hiroc'h, mont e darempred gant sekretourva Kuzul Sevenadurel Breizh, 7 straed Jeneral Guillaudot, 35069 Roazhon Cedex

Pgz : 02 99 87 17 65

UK

# An XX<sup>vet</sup> festival filmoù e Douarnenez

En XXvet festival ar filmoù e Douarnenez ez eus bet kalz a filmoù, kalz a demoù ha tud e-leizh. Filmoù brav ez eus bet, filmoù a zesker bochad dreze ivez ha divizoù foran evit deskiñ ha tabutal gant kalz a dud enne. Berzh bras en deus graet.

Evit merkañ XXvet festival ar filmoù hag e lidañ o devoa an aozourion douarnenez fardet ur c'hokteil a vode temoù hag a oa bet ar bloavezhioù a-raok. Poblou henvroiz (1) eus Aostralia, Norzhamerika ha Norzhskandinavia, poblañs ar Chiapas hag an emsav zapatour, ar maouezed er gevredigezh. Ar filmoù breizhat nevez a oa da vezañ diskouezet ivez ha da heul ar film «BZH, des Bretons et des Bretagne», un diviz diwar-benn Breizh. Evit klokaat roll an temoù e oa ivez kudenn ar broadelezhioù en Europa ! Karget, liesek oa ar program. Ne c'hellimp ket ober amañ un daolenn glok anezhañ.

## STOURM AR POBLOU HENVROIZ

Abaoe ma oa bet ar poblou-se tem ar festival evit ar wech kentañ (poblou Same : 1987; norzhamerindianed : 1979; henvroiz Aostralia : 1991) e santer a-walc'h un emdroadur. Kreñvoc'h e c'houlennont kaout o gwir ha stourm kalet a reont evit-se.

Pouezet o deus war daou anezhe : o gwir a berc'hentiez war an oberoù kulturel (Intellectual property) diouzh un tu hag o gwir war an douar diouzh un tu all.

Ar gwir-perc'hentiez war an oberoù kulturel n'eo ket gwir ar grouerien war an oberennoù, ar gwir o deus da gaout o lodenn ar c'hant. N'eo ket kennebeut ar gwir en deus unan zo bet tapet e boltred dezhañ ha graet ur skeudenn genwerzhel da c'houlenn e lodenn ar c'hant.

Betek 1948 e Norzh Amerika ha betek 1967 en Aostralia, an henvroiz ne oant ket tud evel a lavaront, n'o doa gwir ebet ! Daoust ha goulennet e vez digant al loened hag-eñ int akord da vezañ luc'hskeudennet ? Goulennet e vez digant o ferc'henned... En Aostralia, da skwer, evit luc'hskeudenniñ pe filmañ henvroiz ne vez goulennet aotre nemet digant gouarnamant Aostralia ha tra ken !...

Al lezennadur nevez a roas d'an henvroiz ar gwir da votiñ !... Neuze e c'houlennont kaout, evel pep keodedad, ar gwir da aotren pe da nac'hañ bezañ filmet, ar gwir da aotren pe da nac'hañ e vefe implijet ar skeudennoù anezhe !

Hag evel-just, e c'houlennont ivez kemend-all evit an holl skeudennoù a zo bet graet, en a-raok, hep o aotre hag a zo er film-maouegoù !

## AR GWIR DA BERC'HENNAÑ AN DOUAR A C'HOULENN AN HENVROIZ.

Tem daou film interesant-tre oa bet : «Kenehsatake» ha «Mabo».

Diskouez a ra «Kenehsatake» ar stourm zo bet kaset a-benn gant an Amerindianed Mohawk da zifenn o zachenn-douar enep an ti-kêr a gichen a felle dezhi brasaat un dachenn-golf o kemer un tamm eus an douar Mohawk, hep soursial dioute... 78 devezh stourm ha seziz enep polis Bro-Gebek hag arme gouarnamant Bro-Ganada !...

Sikouret e voent gant poblou Amerindianed all (ur pont pouezus e-keñver ekonomiezh oa bet stanket gant ar meuriad nesañ). Ha manifestadegoù er C'hanada a-bezh, gant Amerindianed met gant Kanadianed wenz ivez, saonegerion ha gallegerion mesk-ha-mesk !

Ar film «Mabo» a gont deomp buhez un den a ouenn du hag a oa a orin un enezennig a Aostralia. Stourmer sindikad oa bet, stourmer sevenadurel, stourmer da c'houtin ar gwir da votiñ evit an dud a liv... E emgann diwezhañ oa ar stourm, dirak al lezioù-barn mar plij, evit ma vefe anavezet



Diviz diwar-benn stourm ar maouezed er bed

gant ar re wenna e oa perc'hennet an douar, en e enez, gant an henvroiz. Hag eñ da zont a-benn !

Gant ar varnadenn-se ez eo bet diskaret ar meizad gwiraouel a «Terra nula» da lavarere o douaroù na oant perc'hennet gant den da vare an «dizoloadenn» gant ar re wenna hag oa, dre se, deuet perc'henniezh ar roue Saoz hag a zo perc'henniezh ar gouarnamant bremañ !

Ha da heul setu 80 % eus tiriad Aostralia a zo goulennet gant an henvroiz.

## ESTLAMM OUZH AN EMSAV ZAPATOUR

Er Chiapas, ur rannvro veneziek e su Bro-Veç'hiko, e vev Indianed hag a zo diskenidi ar v-Mayaed. Henvroiz int eta hogen er vro-se, er Chiapas, ez int al lodenn vrasañ eus ar boblañs.

N'eus bet komzet nemet eus an emsav zapatour. Hag eus an emsav zapatour n'eus bet komzet nemet eus un den : an is-kommandant Marcos, just a-walc'h peogwir e lavar n'emañ ket e penn an afer, ne fell ket dezhañ kemer ar galloud. Abalamour d'an iskis eo ivez pa ne ziskouez ket e zremm, masklet e vez bep taol ma vez gwelet !

Ar berrfilmoù a ziskouez anezhañ evel-se gant e brezeg ha n'eo ket ul lavar politikel kendalc'hek ha gant e vousefent. Evel lodod er bleud emañ, gant an arme, er boblañs, ha lezel a ra ar galloud gant ar gevredigezh keodedel a lavaront.

Goulenn tagus ebet, goulenn diskredik ebet er saladoù hogen seblantañ a rae, a

gred din diantav, e chome un tammig amgredik an dud memestra, evel war c'hortoz.

## AR MAOUEZED O C'HOUZANV HAG O STOURM

An diviz, gant maouezed nemetken war al leurenn, diwar-benn stad ha stourm ar maouezed er gevredigezh zo bet ur prantad fromus, «Kreñv» e-giz ma vez lavaret, er festival.

Er gevredigezh zo cheu enni e c'houzañv an holl hogen gwashoc'h c'hoazh eget ar wazed e pak ar maouezed emezont. Hag int da zegas da soñj ar fedoù.

Merc'hed gwallet e Yougoslavia kozh, ur strategiezh youlek a-berzh ar renerien.

«Stourmet o devoa maouezed Bro-Aljeria dorn-ha-dorn gant ar wazed er brezel a zieubidigezh» eme DJ. Saharaoui, filmouerez he deus graet «Eil Hanterenn Allah». Met digabstret ar vro, n'eo ket ur republik laik 'ni' 'vez savet : relijion-Stad eo an Islam. Fardet eo ar c'habestr. A-Feur ma washa an enkadenn er vro e vo startet ar redioù enkliziel. «En e brezegenn da gemenn krouidigezh da zont kod ar familh, Boumedienn a lavaras, emezi, e vo savet kod ar familh evit gwareziñ ar maouezed. Gwareziñ ar maouezed ? Ya, serriñ anezhe, klozañ anezhe etre peder moger. N'o devoa ket gwir ken da vont er maez o-unan ! Iskeodediz oant deuet da vezañ».

Mougañ a ra hi gant an esmae hag ar vrouez. «N'eo ket ar FIS en deus kraouiet ar maouezed, an FLN an hini en deus graet».

Ha hi da gaozel eus ar brezel diabarzh 'zo bremañ : «Tric'horn ar marv, komzit din deuzoutañ ! E-kichen Aljer emañ hag eno 'ni' ez eus ur bern kazarnioù, eno ez eus ur bern kompagnonezhioù armet bras. Aberzhet e vez ar boblañs, re a dud a zo er vro. Ar mafia an hini 'zo o klask chasual ar belzanted ac'hano rak interesant eo ar vro-se. E-kichen Kêr Aljer, e-kichen ar mor. Aferioù mat 'zo d'ober. Dav goulonderiñ ar c'horn-se».

Hogen stourm a ra ar maouezed : «ar maouezed o devoa stourmet enep an arme gall a zesker d'ar re yaouank ar stourm kuzh».

E broioù Yougoslavia, e Palestina, er Chiapas e stourm ivez ar maouezed ha displeget e voe o stourm hag o labour.

**Teir lodenn a yae c'hoazh d'ober ar festival. Daou dem : Breizh, bezañ breizhat da gentañ, ar vroadelezhioù hag Europa d'an eil hag erfin d'an trede ar filmoù graet e Breizh.**

## «BZH...», UR FILM A RA BERZH, UN DIVIZ DIPITUS

Ur film en deus bet graet berzh forzh pegent er publik : «BZH, des Bretons, des Bretagne» (BZH...Breizhiz, Breizhioù). Div wech e oa bet lakaet er program. Leun-kouch e oa ar sal bep taol ha tud a chom er-maez. Ken eo bet dav bannañ ar film teir gwech ouzhpenn !

Na souezhus n'en dije ket bet ar film-se priz na meneg ar publik ! (S.o. disoc'h ar genstrivadeg).

War un dro gant ar berzh a rae ar film-se e ranker menegiñ ar braz e oa niver an dud a oa deuet da gemer perzh en diviz foran a oa an titl anezhañ : «BZH ou comment peut on être breton» / «BZH pe penaos e c'heller bezañ brezhon». Kement a dud a oa hag e oa bet graet er porzh, er-maez.

Dipitet e seblante bezañ bet an dud. Peogwir e oa politikourien ar brezegenerien ? Pe abalamour n'int ket bet mat ? Div wech oa bet bannet ar film «BZH...» a-raok : an derc'hent ha just a-raok an diviz. Me 'gredfe a-walc'h e oa kalzik a dud a soñje dezho, gant heñvel ma oa an titloù, e vefe bet tabudet diwar-benn danvez ar film ivez. Hogen ar politikourien ne oant ket bet pedet evit komz eus-se, ar filmourien ne oant ket war al leurenn. N'eus bet diviz foran ebet diwar-benn brasañ berzh ar festival.



Berzh bras 'n eus graet an holl divizoù er bloaz-mañ. Leun chouk e oa sal ha porzh skol Victor Hugo bemdez.

An doare m'eo bet an diviz 'ni' zo kaoz dreist-holl. Kadoriad-rener-animatour an diviz, e-lec'h en em ren evel ur c'hadoriad, da lavaret eo an den a ro ar gomz d'ar brezegennierien, a lez anezho da gomz, a rag-wel dre vras pegeit amzer a yafe gant pep hini evit ma c'hellefe pep hini komz hag evit ma chomfe amzer da dud ar sal d'ober goulennoù, hennezh a c'hoarie evel un animatour skinwel. Terriñ ar prezeg politikel o troc'hañ ar gaoz d'an den en un doare divezh, klask lakaat anezhañ diaes e doare pe zoare dreist-holl pa ne plij ken an den d'an animatour. Oc'h urzhiañ an diviz dre goulennoù bihan hag o lakaat ar brezegennierien da respont an eil d'egile e rae d'an diviz dont un eskemm teodadoù. C'hoarzhet e veze a-walc'h met an amzer a yae e-biou hag ar publik, n'eus ket ezhomm dioutañ, evel er skinwel a lavaran deoc'h. N'en doa roet an animatour ar gomz d'an dud nemet pa oant krog da grozal.

Diseñvel e voe an deiz war-lerc'h an diviz diwar-benn ar broadelezhioù hag ar geodedelezh en Europa. N'eus ket plas da gontañ pep tra. Daou dra a venegimp.

Evezhiet oa bet er sal e oa dav diwall gant ar ger «broadelouriezh» rak gwall faoset pe amsteriek eo e bez' e vez broadelouriezh ar «stad-broad» hag a zo gwaskus ha bez' e vez broadelouriezh ar pobloù o stourm da gaout o frankiz.

Daoust da se e hañvale an dud bezañ gwall ankeniet, o welet kazi-sur ar brezel etre ar «broadelezhioù» e Yougoslavia hag emsav faskour Lombardia, evel ma tis-

kouez ar stakadeg daouarn a voe pa echuas unan e c'houlenn o lavaret : «e riskl emaoamp da vevañ antronzioù kriz».

GANT PESEURT HENT E YAY AR FESTIVAL ?

Berzh bras en deus graet festival Douarnenez ar bloaz-mañ c'hoazh. Kalzik muioc'h evit warlene zoken. 18500 antre zo bet ar bloaz-mañ pa oa bet 14500 warlene ha 13500 daou vloaz 'zo.

Pa ya war wellaet ar sifroù ha pa vez laouen an dud, daoust hag-eñ e c'heller ober goulennoù ?

Daou vloavezh diouzh renk n'eo ket ur vinorelezh an hini zo danvez ar festival : ur boblañs liesseurt ha liesvro warlene, meur a vinorelezh ar bloaz-mañ. War wellaet eo bet an disoc'hoù. Daoust hag-eñ e vo dalc'het gant an hent-se ?

Stank e oa an danvez ar bloaz-mañ. Tremen d'an daouamm eus un danvez d'unan all diseñvel mat, ur bern filmoù na c'heller gwelout nemet ul lodennig anezhe. Daoust ha ne vo ket, evel-se, gwallgaset unded ar festival ? War hir dermen daoust ha ne vo ket lakaet en arvar ar «genvegezh» (2) zo er festival ?

Ale ! Perak ober goulennoù ken droc'h ? Kaer eo bet festival ar filmoù e Douarnenez ur wech c'hoazh !

I.A.G. (Komzoù distumet ha lakaet e brezhoneg gant hon ar Gag, kenskriner da vBremañ) (1) Hervoz : annezdi zo er vro a-gozh (Noe), autochtones, aborigenes. (2) Kenvevegezh : convivialité

Priz gouel filmoù Douarnenez 1997

Da gentañ tout e fell deomp lavarout hon eus bet pijadur o welet an 10 film brezhonek dibabet er bloaz-mañ, war-bouez unan diouto. Ar filmoù a oa savet mat kement e-keñver an temoù hag an doare da sevel anezho, ar pezh ne oa ket gwir un nebeud bloavezhioù zo.

An dibab n'eo ket bet aes d'ober avat, pa ranker lakaat war ar memes live, filmoù 1 vunutenn hanter ha filmoù 50 munutenn pe c'hoazh klipou, tresadennoù bev, filmoù diellañ. Dibabet hon eus ar film «Mistri ha Fermouren» evit ar gwidigezh dibar a gaver eztaolet ennañ gant Mikael Treger, dre ma'z eo deuet a-benn da sevel un oberenn en he fezh o kinklañ pennadoù-kaoz, tammoù pezh-c'hoar, dielloù istorel ken ne gaver ket hir e amzer eus ur penn d'egile d'ar film. Ha dreist-holl, evit an danvez a zo ennañ, pa ziskouez buhez ha stourm peizantel hon bro dindan gwask o c'hennozh diskrupul pa va vije beleien anezho.

Kuit da gaout un dielennadur politikel sech diwar-benn stourm ar renkadou e Breizh e kavomp e «Mistri ha Fermouren» istor gwir familh Naig Rozmor, leurennet gant «Ar Vro-Bagan» diwar he lev «Ar Mestr» hag o komprenomp gwelloc'h penaos eo aet Naig da glask ur marolod da bried kurt dezhi da zimeziñ gant ur peizant !

C'hoant hon eus bet ivez da reiñ ur priz ispisal da «Roger ar C'hilhog» evit an ijin a gaver ennañ hag an doare dispar da sevel ar film. Ezhomm bras a zo da grouñ reoù all a seurt-se d'e haul evit brasañ pijadur ar re yaouank koulz hag ar re vras, ha dreist-holl an dud o teskin brezhoneg. Gant ma vo gwelout buan war ar skinwel.

Pennadoù-kaoz graet e-pad ar sizhunvezh vo kavet en niverennoù o dont

Evit ar wech kentañ

Tud a vicher ar c'hleweled ha Kuzul Sevenadurel Breizh oc'h en em gavout asambles.

Da-geñver 20vet deiz-ha-bloaz Festival sinema Douarnenez e oa deuet ar soñj gant Daoulagad Breizh ober e vad eus an degouezh evit lakaat pennoù Kuzul Sevenadurel Breizh d'en em gavout gant tud a vicher ar c'hleweled o labourat e Breizh. D'ar Gwener 22 a viz Eost 1997 e oa deuet eta tud a vicher ar servij publik (F3), tud a vicher dizalc'h hag izili eus Kuzul-Merañ Kuzul Sevenadurel Breizh. Ar wech kentañ an hini eo e veze aozet ur seurt emvod gant ar C'huzul ha deuet e oa un daou-ugent den bennak betek t-kêr Douarnenez da hullañ an divizoù.

Talvoudus eo bet emgav kentañ-se ha sklaeroc'h eo deuet da vezañ ar pezh a c'hortoz ar bed sevenadurel digant ar broduouren, ar sevenenien hag ar senarioouren evit a sell ouz ar filmoù, ar filmoù berr, an abadennoù brezhonek, abadennoù gouestlet da sevenadur Breizh, hag an reas imenezget eo bet ar c'hrat-se meur a wech abadennoù evit yaouankiz Breizh (netra en deiz-a-hiziv !).

Ur daolennad kinnigoù zo bet displeget hag ar soñj kentañ zo deuet diwarno a oa bet mont e darempred gant an dilennidi evit kaout arc'hant ha peadra da labourat e gwionez. Krouiñ ur skoaell d'ar produiñ, ur skoaell a-raozh evit produiñ e brezhoneg. Goude div urvezhiad a zivizoù, a eskemmoù, taer a-walc'h a-wechoù met seven bepred, e oa deuet anat e oa poent aozañ un diviz bras etre ar Rannvro, bed ar c'hleweled hag an emsav sevenadurel breizhek. An Itron Hervelyne Guillou (kuzulier-rannvro) a oa er sal he doa lavaret e save a-du gant ar soñj-se.


Sant-Brieg : trec'h an emsav war an F.N. Gall



Kaset oa bet dirak Lez-varn Sant-Brieg renouñ ar c'hazalennoù «Breizh-Info» ha «Le Peuple Breton». Klemm a ra an Aotrou Fernand Le Rachinel hag e gevredigezh «S.A. Les Presses Bretonnes» a-enep dezhe dre ma oa bet, sañset, droukkomzet diwar o fenn. Gouleni a rae digant pep hini un digoll a 2 vilion a lurioù gall. D'ar Yaou 28 a viz Eost e voe roet he barnadenn gant al Lez-varn. Lavarout a ra, da gentañ ne c'hell ket barn Mansal Menard, renour «Breizh-Info» : ne oa prouenn ebet e vije bet gwerzhet an

niverenn ag ar gazetenn bet taget en dachenn dindan beli Lez-varn Sant-Brieg. Da eil e vez didammlet an Aotrou Joel Gwegan, renour «Le Peuple Breton», daoust d'ar pennad tagus bet embannet er gazetenn : arguzennoù reizh a oa en destenn. Neuze e rank al Lez-varn nac'hañ an digolloù bet goulenet ha kondañ ar c'hlemmour da baeañ ar mizoù.

K.A.D.



Kemennadenn

Emsaverien Gwiana en toull-bac'h

Sevel a ra Unvaniezh Demokratel Breizh a-enep ar gwaskerezh dibaoze e Gwiana a-enep emsaverien eneprevadeniñ eus sindikadoù 'zo : meur a zen a chom en toull-bac'h abaoe miz Ebrel, a-wechoù pell diouzh o vro ; tud all 'zo bet paket gant ar polis e penn kentañ miz Gouere ; d'an 21 a viz Gouere ez eus bet paket en-dro un den e karg eus Unvaniezh Labourerien Gwiana (harzet e miz Ebrel ha dibrizoniet da c'houde) a unan gant e geneilez hag e verc'h a zaoù vloaz evit un digarez a zo doare da vezañ un tu da glask lakaat anezhañ da devez ; kargidi ar c'huzulou lec'hel, izili eus Unvaniezh Labourerien Gwiana, a vez diblaset pe skarzhet gant ar C'huzul Meur.

Soñjal a ra d'an UDB ne vo ket e mod pe vod en ur gendeñhel gant ar gwaskerezh diskoulmet ar gwall guidennoù ekonomikel, sokial ha zoken e sell ar yec'hed gouzañvet hiziv an deiz e Gwiana, a vez dilabour enni ar c'had eus an dud oberiant, Derc'hel da spañañ an emsaverien oc'h abegañ stad an traoù a zo un dislavar

gant ar c'hoant da adkregiñ gant Breujoù Meur Gwiana ehanet da vare ar gouarnamant kent.

Setu perak e vez goulennet gant an UDB, kengred gant emsaverien eneprevadeniñ Gwiana, e vefe dibrizoniet an holl emsaverien sindikadel ha politikel a zo c'hoazh en toull-bac'h, e vefe paozezet gant ar prozezioù ha gant an holl gwaskerezh hag e vefe digoret un diviz gwirion gant holl nerzhioù bev Gwiana, gant an aozadurioù eneprevadeniñ evel-just en o zouez.

Gant ar soñj-se he deus an UDB skrivet d'ar Ministr Kentañ, da Vintiri ar Justis ha da Sekretour-Stad evit an Aferioù Tramod. Goulennet he deus ivez digant kannaded ha senedourien Vreizh hanterij ouz an hevelep pennoù bras. Helliñ a ra e vefe trec'h ar poell hag an doujañs d'an demostratezh war ar c'hoant da virout kousto pe gousto stad an traoù en ur ober war un dro gant ar garotezenn hag ar vazh hag en ur aozañ un irienn nevez a-enep an emsaverien eneprevadeniñ.

U.D.B.

### Skolaj Diwan Kemper

**Pep distro-skol e ra Diwan ur c'hammed ouzhpenn evit en em ziazezañ gwelloc'h war ar vro, evit respont gwelloc'h da c'houlennou ar familhoù, evit kinnig da muioc'h a vugale c'hoazh un deskadurezh e yezh o bro, an deskadurezh o deus ar gwir da gaout.**

Rentañ ur servij foran eta, setu ar pal ha setu dres ar pezh 'zo bet graet o tigeñ Skolaj Kemper. Digeñ ur skol, ur skolaj, ul lise a zo evel plantañ ur weznenn nevez e koad ar brezhoneg evit ledenaat he zachenn. Pep gweznenn er c'hoad-se he deus un istor, pep gweznenn a zo ul lodenn eus istor Diwan, ul lodenn eus istor ar brezhoneg, ul lodenn eus istor an dud a zo o kemer intrudu ha kiriegezhioù a-benn kemer peg en o dazont. Skoilhoù e kaver avat kement evit plantañ ur weznenn hag evit digeriñ ul lec'h nevez d'ar brezhoneg. Evit mont dreist da gemet skoilh a gaver dre ret war hent ur skol nevez e ranker dizehan, hag e-pad pell a-wechoù, displegañ hag arguzenniñ hag addisplegañ c'hoazh atav hag atav hep koll kalon a-benn kenderc'hin pe peurgredc'hin tud nevez ha ledanaat evel-se tamm-ha-tamm kelc'h hor mignoned.

#### UN HENT HIR

Kendalc'h Diwan 91 en doa lakaet da bal digeriñ ur skolaj e Kemper e 1996. Hini 92 en doa adstudiet ar gudenn ha votet digeriñ anezhañ e miz Gwengolo 1997. Ur foz a zo avat etre ur vot, c'hoant un deiz, hag ar youl a ranker kaout, an hent digompaz a ranker heuliañ, evit mont betek penn. Ne 'z eus ket plas amañ da zisplegañ dre ar munud penaos eo bet tamm-ha-tamm savet e vragoù da Yann. Ne c'heller ket avat chom hep menegiñ e oa kroget da vat gant ar raktres-mañ e miz Kerzu 1994 gant ar sonj, degaset gant an U.G.B., hag asantet kerkeret gant Divyezh ha gant Diwan da zigeriñ ur skolaj publik divyezhek. Ar pal-se eo en deus renet hor stourm e-pad ur bloaz hanter, betek an 2 a viz

Gouere 1996 ma embannas ar Rector Lostis ne rofe ket asant da zigeriñ ur seurt skolaj. An tri aozadur a zivizas kerkeret neuze, o toujañ d'ar rakdivizoù a oa bet kemeret adal ar penn kentañ, eo ur skolaj Diwan a vefe digoret e Kemper e 1997. Ur skolaj Diwan a zegemerfe kement brezhoneger bihan c'hoant gantañ bezañ kentellet en e yezh. Ha n'eo ket an dra-se ar servij publik ?

Evit mont betek penn avat ez eus bet ezhomm eus kantadoù a daolioù pellgomz, eus degadoù a emvodoù, eus meur a deuliad ha meur a lizher. Ezhomm 'zo bet da gredc'hin Ti-kêr Kemper, n'eo ket bet re ziaes, ar C'huzul Meur, ar Rector, Enseller Penn-ar-Bed, ar Prefed, al Lez-varn... Aon hon eus bet a-wechoù da chom bout a-raok ar fin. Aon da vezañ divarrek da gredc'hin an holl Aotrouien-se e koulz. Kroget hon doa da brientiñ en hor pennoù ar manifestadegoù hon defe da aozañ evit an distro-skol. Ma ! D'an 28 a viz Gouere, ur miz a-raok an distro-skol, e embanne al lez-varn disoc'h e brederadennoù a adreot e oamp da zigeriñ ur skolaj e Kemper !

Ur bloaz e rankimp gortoz avat, amzer d'ober al labourioù, a-raok mont 'barzh ar savadurioù a zo bet prenet gant an Ti-kêr. Un diskoulm da c'hortoz 'zo bet kavet, gant sikour an Ti-kêr ivez, er savadurioù a oa gwechall kloerdi Kemper. Familhoù ar 55 bugel enskrivet o deus bet tro d'o gweladenniñ d'ar 27 a viz Even bodet ma oant eno da gaout keloù eus ar skolaj da zont ha d'ober anaoudegezh gant ul lodenn eus ar skipailh pedagogel ha Yann-Fañch Jacq, an is-rener nevez anvet, en o zouez. Is-rener rak ne vo Skolaj Kemper, evit ma c'hellfe goprou ar gelennerien bezañ kemeret e karg gant ar Stad, nemet ur skolaj-stag, ul lodenn eus skolaj Roparz Hemon hag a vo renet gant Pascale Chevillard.

Met n'eo netra evit c'hoazh ar pezh a zo bet graet betek-henn. Bremañ eo e krogo da vat Skolaj Kemper gant e gefridi : kinnig d'ar vugale, o tec'hel kont eus personelezh pep hini, ar binvioù a ranker kaout evit bezañ gouest da gemer peg en e vuhez hag er vuhez a-strol, an alchweziou a ranker kaout evit dont da vezañ un 'Denn. Chañs vat da Skolaj Kemper.

Daniel Kernalegenn.

## KANT DRE GANT

Diwan ar daouzek skoliad eus lise Diwan, er Releg-Kerhuon, a oa bet o tremen amrouennou ar bachelouriezh a-raok an hañv e voe 12 o tapout o bachelouriezh. Kalz a dud, kent tud eus Diwan kent tud diavaez, a oa o c'hortoz an disoc'hou-se. Diwan un niver ken bihan ha 12 eo diaes dezastum tra pe dra, met rankout a ra



Dor lise Diwan - poent eo mont kuit !

an dud o doa disiz diouzh ar c'helenn roet e lise Roparz Hemon anavez e c'hell liseidi tapout dre ar brezhoneg ul live deskadurezh kevatal d'an hini a c'heller tapout e liseoù gallek. Goude bezañ embannet ha lidet an disoc'hou-se o deus renerien Diwan lavaret e oa labour ganto c'hoazh evit al lise. Er bloaz-mañ e vo kendalc'hed da labourat evit stalinañ lise Diwan e Karaez - a-benn Gwengolo 1998 e tlefe dilojañ eus ar Releg da vont d' - hag evit kaout muioc'h a glasoù el lise, evit kinnig un dibab studioù ledanoc'h d'al liseidi - ne oa nemet div naoziad, lennegel pe skiantel, ar bloaz-mañ. En distro-skol-mañ e talc'ho al liseidi da vont d'ar Releg, tra ma vo tri skolaj, er Releg-Kerhuon, e Plijidi hag e Kemper. N'eus skol nevez ebet o tigeñ er c'hentañ derez avat. Bez' eo koulskoude an doare nemetañ da suraat kresk Diwan er bloavezhioù da zont.

### DIWAN PLABENNEG

Betek an distro-skol en deus dalc'het maer Plabenneg, e bro Leon, d'ober brezel ouzh skol Diwan e gumun. Nac'h a ra ar maer sikour tud Diwan da gavout ul lec'h brasoc'h evit o skol, daoust m'eo kresket niver ar vugale enni. A-raok an hañv hag adarre e dibenn miz Diwan, er Releg-Kerhuon, a oa bet o klemm : «26 skoliad ha 2 skolaer zo bremañ en hor skol ha n'eus nemet ur sal evit o degemer». Klask a reont ur savadur all evit dilojañ met bep taol ma kavont unan e nac'h ar maer reiñ e aotre da zigeriñ. Abaoe 1993 ez eus ur skol Diwan e Plabenneg, bet krouet gant familhoù a gase o vugale da skol Diwan Lesneven diagent. Hag abaoe an digoradur ez eus diaesterioù gant an ti-kêr, en deus atav nac'het sikour ar skol gant ur savadur a vefe prestat pe feumet da Zwan. Ez ofisiel e lavar ar maer, Louis Kozh (R.P.R.), n'en deus «netra a-enep Diwan» met dre ma'z eus klasoù divyezhek er skol gristen Santez-Anna, e Plabenneg, e kav dezhañ n'eus ket ezhomm eus ur skol Diwan en e gumun. A-raok an hañv e oa bet kavet ul lec'h gant tud ar vugale e lakad labourerezh Pench'oad, met nac'het e voe gant ar maer e vefe digoret ur skol eno.



#### BUGALE DIWAN PLABENNEG ER MAEZ

N'eus lec'h dereat ebet evit degemer klas kentañ derez Diwan Plabenneg, ennañ 26 bugel evit an distro-skol 97/98. Betek henn e oa bet lojet ar skoldi yaouank hag ar mest-skol en ur sal c'hoari e kav un ti prevez. Kalz re strizh eo deuet da vezañ ar sal, hag e 1997 eo mezhus gwelet c'hoazh tud Diwan nac'het dezho salioù klas gwirion. Evit klemm ha diskouez o c'houmar o deus tud ar vugale ac'hubet gant ar skolaerien salioù an ti-kêr. Skol zo bet gant d'ar 26 skoliad yaouank e sal an dimezioù...

### Div Yezh

Skol divyezhek e Redon Evit ar wech kentañ eo bet kinniget gant ti-kêr Redon, ur skol divyezhek da vugale bro Redon. E skol ar gorriganed eo bet staliet ar skoldi nevez dindan renerezh Yann Duchet, bet skolaer er bloavezhioù tremenet e klasoù divyezhek Skol ar Frank e Roazhon. 23 bugel zo bet enskrivet evit an distro-skol-mañ ha n'eo ket echu, lod a vo lakaet o anv da vare Pask. Disoc'h ul labour efedus a-berzh kerent ar vugale, ar skolaer ha brezhonegerien Redon eo. Setu bremañ ti bloaz e oa bet kroget ganto da labourat war ar raktres-mañ ha deuet int a-benn da gredc'hin an akademiezh hag an dilennid.



#### AR PREFED A-ENEP DIWAN KEMPERLE

Hervez Prefet-Penn-ar-Bed emañ ar raktres zo e Kemperle da sevel ur skol Diwan nevez e-maez al lezenn. Skrivet en doa Sokretour Meur ar Prefet, just a-raok an dezhañ edo -e-maez al lezenn- diviz ti-kêr Kemperle da arc'hantañ ar savadurioù nevez zo gant Diwan Kemperle, straed Pont-Aven. Dre ma kreske an niver a skoldi er skol Diwan eno e oa bet ezhomm da gaout savadurioù nevez evit o degemer. A du e oa aet etre kêr Gempelle ha departamant Penn-ar-Bed, a-raok an hañv, war an emglev evit arc'hantañ klasoù raktres da vezañ lakaet war un dachenn zo d'an ti-kêr, pep hini o tegas e skodenn. Hogen e dibenn miz Eost e oa bet kavet gant servijour ar Prefet ne oa ket an emglev-se hervez lezenn, dre ma ne c'hell ket ar c'hunioù, emezo, lakaat o arc'hant da sevel «skolioù prevez». Eus tu ar Prefet e lavarer e ranker freuzañ an emglev ha klask kavout un diskoulm hervez al lezenn. Eus tu dilennerien ar brezhoneg e keñverien al lizher-se ouzh stivou prefed Pirenoù ar Reter evit mirout ouzh dilennid o departamant-se d'ober gant ar c'hatalaneg pe ouzh re hini enez ar Reunion a lak berz war implij ar c'hreoleg gant an dud a labour er skolioù.

## Distro al livourion noz

Dibenn miz Even, Bro Montroulez, penn-kentañ miz Gouhere, Bro an Aina, kreiz Gouhere : Kreistez Penn ar Bed, n'eo ket chomet ar Sabourion da dortal. Degadoù a baneloù-hent distrujet, kantadoù al livet, e du peurliesañ, e gwenn a-wechoù. En ur gemennadenn bet sinet gant Nolwenn Ilias, mouezh aotreet he c'hrenvedigezh, eo bet roet an abegoù : «Erru eo poent bras, emez, da Guzel Departamant Penn-ar-Bed sevenañ e bromesou. Er Mor-Bihan e rank ar C'huzul Jenerel ha Servijour an Avelnig gouzout e lezio o zro». Sindikad Kumunioù Bro Pont-n'Abad en deus skrivet da Prefed Kemper evit goullenn digantañ lakaat an ardig war al livourion. Kadarnad «Emglev ar Vro Vigouden» an Actrou Michel Le Roy, en deus kaset ur gemennadenn d'ar gazeten «Ouest-France» evit tagañ al livourion noz, «o tanzus da virvien an obenoù-mastarin paneloù-hent bet anavez gant ur gromadig dispac'helour sig ataherenn» hag eo'h ober eus e gevredigezh «demourion wirion yezh ha sevenadur Breizh». Ne voe gwelet kemmañ ebet a-berzh S.A.B. e-barzh «Ouest-France».



E dibenn miz Eost e oa bet livet livourion brezhonek war studio Radio France Bretagne Ouest e Brest. Hervez ur gemennadenn kaset d'ar c'hazetennoù o oa bet graet kement-se gant Stourm ar Brezhoneg evit klemm a-ono ar fad a vez graet war ar brezhoneg gant renerezh Radio France. Ha Stourm ar Brezhoneg da zegas da soñj ne vez skignet nemet un peviriek eurvezh betek a veshoneg gant R.B.O. bep sizhun, tra ma n'o devez an dud zo o chom er reter da Penn-ar-Bed nemet un abadenñ div eurvezh bep sizhun war wagnonoù Radio France Armorque. Lavaret a ras Stourm ar Brezhoneg o deus gant ar Vretoned da gaout ar servij skingomz brezhoneg e Breizh a-bezh hag e tlefe Radio France zo arc'hantet gant an taos war ar c'hweledd kinnig ar servij-se da sabourien ar pemp departamant. Un nebeud mizioù zo e oa bet livet livourion hañvel war mogennoù tiez Radio France Loire Occitan e Sant-Nazer hag e Naoned.

UR BODAD LABOUR  
WAR AR YEZHOU  
«RANNVROEL»  
ER VODADENN  
VROADEL C'HALL

Da-geñver skol hañv Rannvroioù ha Poblou Kengred, a vod strolladoù broadelour pe rannvroelour eus ar C'hwech'korn (Breizh, Korsika, Elzas, Hanternoz Euskadi, Hantarnoz Katalonia, Okitania, Savoia, Flandrez ha Franche-Comté), o doa disklêriet tri c'hannad nevez e oant o vont da grouñ ur bodad labour er Vodadenn Vroadel war ar yezhoù anvet rannvroel. Padet e oa bet Kofi Yamgnane (Strollad Sokialour), Ivon Abiven (tu kleiz), o diaou eus Penn-ar-Bed, ha Jean Codognes (Strollad Sokialour), eus Pirineoù ar Reter, da zont da gomz gant dieuridi strolladoù brogarour Rannvroioù ha Poblou Kengred (Frankiz Breizh hag U.D.B. eus Breizh, U.P.C. eus Korsika, Partit Occitan, Eusko Alkartasuna...) e Prada e hanternoz Katalonia. Hag eno o doa roet da c'hrouzout an tri c'hannad nevez e vefe tri c'hral labour gant ar bodad studi emant o vont da sevel "lakaet Bro-C'hall da sinañ Karta Kuzul Europa evit ar yezhoù anvet rannvroel ; lakaet cheñch mellad 2 Bonreizh ar Stad C'hall (an hini a lavar ez eo ar galleg "yezh ar Republik") ; ha lakaet degemer lezennoù evit kas war-raok ar yezhoù anvet rannvroel. A-raok an hañv e embanne U.D.B. e oa ret d'ar gouarnamant nevez sinañ Karta Kuzul Europa a-raok dibenn ar bloavezh, bremañ e lavar Rannvroioù ha Poblou Kengred e kenlabour gant an tri c'hannad evit kizidkaat ar gammad all hag ar gouarnamant. Gwelte e vo pegel amzer a vo ezhom evit ma vefe kizidkaet ar gouarnamant-se.

LIZHER-DIGOR ROUDOUR

Gant Roudour ez eus bet savet ul lizher-digor diwar-benn an doare ma vez skoazellet ar re zo o labourat war dachenn ar brezhoneg gant Departamant Penn-ar-Bed. Hervez o skind ez eus droukziforc'h eno o c'heñver. Skouer dezvezh ar c'hevredigezhioù aozet gant Park Arvorig a roont, dezvezh e-lec'h ma ne oant ket bet aotreet da zont war zigarezioù a seblant bezañ touli. En tu-hont da afer Roudour ez eo war dezverkioù an Departamant evit skoazellet pe chom hep skoazellet e lakaer ar goullenn. Perak ne oa bet roet gwenne ebet da Roudour e 1997, pa oa bet roet da Stumdi ? Ma eo an abeg bennak ne oar den pehini e oa. Heñvel a c'hallfe bezañ lavaret evit teulioù all.

Goullenn a ra Roudour eta e vefe lakaet an holl da c'hrouzout petra eo an dezverkioù skoazellet pe chom hep skoazellet, da lavaret eo, lakaet en ur mod all, petra eo politikerezh yezhel an Departamant...

50vet Kamp Eirekeltiek  
ar Vrezhonegerien

Kalz a dud a oa deuet da lidañ 50vet Kamp KEAV e Skaer d'ar Sadorn 19 a viz Gouere. Gant kalz a blijadier o doa stajidi kozh ha yaouank KEAV en em adkavet d'an deiz-se. Prezegennoù, diskouezadeg diwar-benn istor KEAV, degemer ofisiel gant ar maer, banne-a-enor, pred, c'hoariva, sonadeg, fest-noz, netra na vanke evit ar gouel-mañ. Deuet e oa evit an degouezh kendirvi tramor, iwerzhoniz ha kembreiz. Displeget e oa bet e-kerz ar mintivezh d'an dilemmel ha d'ar gelaouennieren pegen a-bouez e oa d'an deskarded kavout ul lec'h soubirdigezh gwirion evit dont a-benn da gomz da vat e brezhoneg. Al lec'h nemetañ kinniget e Breizh : staj KEAV. Ur skol-veur hañv sinus, lec'h ma vez studiet aketus met ivez ul lec'h ma vez bevet penn da benn e brezhoneg deus ar mintin betek an noz. Kement tra a vez e brezhoneg kentelioz, predoù, sport, c'hoariva, beiliddegou, poumetadennou... Deuet eo da vozañ ken brudet ar skol-mañ m'eo bet ret da renerien ar c'hamp nac'h ouzhpenn 60 stajiad er bloaz-mañ ! Ur preder nevez evit buhezourien ar staj ; penaos degemer an holl stajidi da zont ?

BREST

Savet ez eus ur raktres solut da grouñ ur skour eus an "Alliance Française" e Brest, hag unan all e Roazhon, evit sikour dasparzh sevenadur ha yezh Bro-C'hall da estrenien o lont da Vreizh. Betek-henn n'eus ket eus an "Alliance" e Breizh. Hervez Ouest-France (Brest 29.07.97) ez eo bet degemeret kate raktres Brest gant diennidi, skolveuridi, hag an "divizion". Ha kontañ a c'hallont war harp ar c'hannad nevez Kofi Yamgnane.

OUEST-FRANCE

Embannet en deus renezh Ouest-France ur "steuñv sokial", da lavaret eo ur steuñv difredañ evit 180 post labour a vo serret er mizioù da zont. Tud tremen 55 bloaz eo a vo lamet o fostoù e-giz-se, micherourien, labourerien eus ar servijoù melestradurel pe gazetennieren. Pemp bloaz zo, da heul ur "steuñv sokial" all, e oa 120 den a oa bet lakaet dilabour. Kemennet en deus renezh Ouest-France ivez e oa o vont da

embann ur gazetenn d'ar sul hag e teufe ar pemdezieg er-maez d'an devezhoù gouel ivez. Ha kement-se evit stourm ouzh he c'hevezenien, evel an Telegramme da skouer a zeu er-maez d'an devezhoù gouel pevurliañ.

KERVARKER

Mont a ra mat an traou gant an Aotrou Kervarker, an Ittourer staliet war ar rouedad gant Romuald Texier, eus ar gevredigezh Sav-Heol evit brudañ ar brezhoneg. Gweladennet e vez kalz gant ur 500 a dud devezhoù a vez, eus Breizh-Veur, ar Stadoù-Unanet, Kanada pe Alamagn dreist-holl. Kentelioz brezhoneg a zo dre ar galleg, ar saoneg hag an alamaneg. Danevelloù brezhoneg zo ivez, dam skrivet gant liseidi Diwan, evel o romant an Huñvre dihan. Ha pennadoù a bep seurt e saoneg hag e galleg diwar-benn ar brezhoneg. Raktresoù all zo ivez. Gallet e vo o c'has da benn mar bez skoazell digant brezhonegerien, saonegerien, alamanegerien, pe spagnolegerien evit liesaat an danvez. Ar re o dije c'hoant da skoazellet pe kas danvez a c'hall skrivañ da Sav-Heol, 42 straed al Ireu, 35 136 SANT JAKEZ. Chromlec'h Kervarker. <http://www.enst-bretagne.fr/kervarker>.

EDF hag an energiezh nukleel

A-benn derc'hel he fouez d'an energiezh nukleel, emañ EDF o klask mirout ouzh ar c'hevrezerezh d'en em astenn war tachenn ar pourchas tredan. «Ma vefe lezet ar marc'had da renkañ stad an traoù, ne vefe warc'hoazh nemet kreizennoù dre c'haz'z a anvaz unan eus pemnerien an embregerezh Stad. Anat e teu da EDF ez eo re goustius nerzh ekonomikel he mod-produñ ha klask a ra saveteñ anezhañ diwar goust ar vevezourien

BROADOÙ KENTAÑ KEBEK

Adalek ar 16 a viz Gwengolo ha betek an 2 a viz C'hwevrer 1998 e vo tu da velet e Mirdi Breizh, e Roazhon, un diskouezadeg dibar diwar-benn «broadoù kentañ Kebek». A-zivout an Amerindianed hag an Inuit zo o vevañ e Kebek, ne oar ar braz ac'hanomp netra pe dost. Dre an diskouezadeg-se e vo tu da c'hrouzout hiroc'h diwar-benn sevenadur poblou evit ar Mikmak-ed, ar Mohawk-ed, an Huron-ed, an Inuit hag all. Luch'skeudennoù ha traozeu eus buhez pemdeziek ar poblou-se a c'hellor gwelad

eno, binvioù, oberennoù arz hag all, deuet dezho eus an amzer wechall pe nevez degemeret ganto dre o eskemmoù gant poblou all, evel ar re wenn. Evit dont da weladenn ar mirdi a-stroll, e ranker mont e darempred abred gant Mirdi Breizh, 20 kae Emile Zola, 35000 Roazhon, pgg 02 99 28 55 84.

«Digor kalon» e brezhoneg



Diwar skouer «Tan dei» Bro-Oueloù, setu ur gevredigezh o kinnig emgavioù evit ar re a fell dezho komz ha kejañ ouzh brezhonegerien ar vro, adalek penn kentañ miz Gwengolo. Memes dezvezh, memes eur, memes lec'h : bep Gwener adalek c'hwec'h eur e «Kate Du» e tal-kichen ti-gar Lannuon. Degemer mat d'an holl.

KENDALC'H KELTIK  
ETREBROADEL

E dibenn bodadeg ar C'hendalc'h Keltiek Etrebroadel a oa bet dalc'het e Dulenn, en Iwerzhon, e miz Gouere, e oa bet votet mennadou o tennañ da Vreizh. Fellout a ra da berzhidi ar Gouarnamant gall Karta Kuzul Europa evit ar yezhoù bihaniver. Ha ma ne vez ket asantet gant Bro-C'hall e c'houlennont e vefe graet un enklask diwar-benn ar gwirioù sevenadurel e Breizh gant ur strollad etrebroadel, evel da skouer Unvaniezh Kumuniezhioù Kenel Europa (U.F.C.E./F.U.E.N.). Goullenn a rejont ivez digant ar gouarnamant gall lakaat ar brezhoneg da vezañ kelennet en holl skolioù Breizh d'an holl vugale o do

c'hoant, ha sevel ur servij skingomz hag ur servij skinwel hollvrezhonek arc'hanter gant an taos skinwel paeet gant ar Vretoned. Sachañ a rejont ivez evezh ar media war an ezhomm zo da skignañ e pep bro gelliek kelier eus ar broioù keltiek all.

AR MAMMENNOU  
GREMM DIHESK

Un diviz diwar-benn ar «mammennoù gremm dihesk» a vo dalc'het e Mur d'an 18 ha d'an 19 a viz Here. Aozet e vo gant Skol-Uhel ar Vro hag he c'hevrenn «Gwener an endro». Ar c'henderc'hañ gremm e Breizh, gremm an avel, gremm an heol, ha traoù all c'hoazh, a vo dodennou an divizoù a vo eno, a-raok un eil emvod a vo dalc'het e Naoned d'ar 16 ha d'ar 17 a viz Mae 1998. Digor e vo an diaou emvod-se d'an holl re zo troet gant kudeonnoù an endro, met ivez gant istor Breizh pe gant armerzh ar vro. Evit gouzout hiroc'h : Skol-Uhel ar Vro, 1 straed Raoul Ponchon, 35069 Roazhon Cedex.

AR GELTED HAG  
AL LEDENEZ IBEREK

E Skol-veur Breizh-Izel e vo dalc'het, d'ar 6, 7 hag 8 a viz Du, devezhoù studi diwar-benn levezon ar Gelled war istor ha sevenadur el ledenez iberek. Dont a ray kelennerien hag enklaskerien skolioù-meur al ledenez da Vrest evit lakaat ar gaoz, a-greget gant o c'hanvredeur eus skolioù-meur Breizh, war istor, honniezh, yezhoniezh poblou Spagn ha Portugal. (Evit gouzout hiroc'h : Skol-veur Hañv Breizh, 5 straed Pasteur, 56100 An Oriant).

UEL AR VUHEZ

Da-geñver «Gouel ar Vuhez» a vez kenaozet bep bloaz e miz Du gant kêr Wened ha gant kevredigezhioù sevenadurel breizhek ar gêr-se, e vo aozet, ar bloaz-mañ, ur gennstrivadeg danevelloù ha galleg pe e brezhoneg. «Korrigadenn dec'h ha hiziv» eo dodenn ar gennstrivadeg, zo digor d'an holl. A-raok ar 15 a viz Here e rank ar skridoù bezañ kaset da di-kêr Gwened. Evit gouzout hiroc'h e c'heller pellgomz da «Service d'Animation Culturelle» an ti-kêr, 02.97.01.81.00.

LIVIOU AR VRO

Etre an 18 hag an 21 a viz Gwengolo e vo devezhoù «Livioù ar Vro» e Kemper, kenaozet gant an ti-kêr ha gant Ti ar Vro.

D'ar yaou 18 a viz Gwengolo e vo diskouezet ar film «BZH, des Bretons, des Breagnes» savet gant Olivier Bourbeillon ha Marie Hella, er sinema «An Tok Ruz» hag un diviz a vo war-lerc'h gant azerien ar film ha gant tud all. Gweladennñ kôer a c'hellor ivez a-hed an tri devezh-se, arbrouget gant heñcherien gallegerien pe brezhonegerien. D'ar sañvadenn 20 a viz Gwengolo, er Baball, e Konwiler, e vo gourenadegoù, sonerezh gant sonerien yaouank, ha fest-noz war-lerc'h. D'ar sul 21 e vo kinniget deoc'h un abadenenn sonerezh anvet «Abadenenn an hengoun bev» gant bagadoù, kelc'hioù keltiek ha lazou-kanañ ar c'horn. (Ti ar Vro, 2-4 straed Jakez Karter, 29000 Kemper, pgg 02 98 90 70 43).

ENSADUR RANNVROEL  
AR GLAD

Gant an I.R.P.a. (Institut Régional du Patrimoine, Ensadur Rannvroel ar Glad) e vez aozet devezhoù stummañ war ar glad naturel ha sevenadurel a Vreizh. Graet eo an devezhoù-se evit tud zo dre o micher pe o c'harg oc'h ober tamm pe damm war-dre difenn ar glad naturel pe sevenadurel : diennidi, pemnoù kevredigezhioù, mirdiourien, kelennerien, ... Evit kaout roll an stummadurioù-se : I.R.P.a., 6 rue du Chapitre, 35044 Roazhon Cedex, pgg 02 99 79 39 31).

CELTOMANIA  
E BRO-NAONED

E penn kentañ miz Here e vo aozet ar bloaz-mañ gouelioù Celtomania. Kregñ a ray an abadennoù d'an 3 a viz Here evit echuiñ d'an 11 eus ar miz : Patrig Ewen, Gilles Servat, Annie Ebril, Djiboutep, ar bagad Gilles de Retz, ha re all c'hoazh a vo tu da glevet ar sizhunvezh-se. Evit kaout roll resis an abadennoù, mont e darempred gant Agence Culturelle Bretonne Morvan Lebesque, 24 kae ar Foz, 44000 Naoned, pgg 02 51 84 16 07, pe Celtomania pgg 02 40 76 46 99).

LEVRAOUEG BREIZH

Abaoe un nebeud mizioù bremañ n'eus mu den ebet o labourat e Levraoueg Breizh e Pijidi. Ranket he deus ar gevredigezh dic'hoarñ he implijadeg, lizabel Araujo, abalamour da ziaesterioù arc'hanter. Delc'her a ra Levraoueg Breizh da zasmus levrioù avat, ha spi eo e vo tu da adigeriñ ur post labour dizale. En ur savadur e-kichen Skolaj Diwan Pijidi emañ staliet Levraoueg Breizh.

# Panama

## Ar ganol o cheñch perc'henn

D'ar 31 a viz Kerzu 1999, e vo restaolet da Stad Panama, he riegzh war zonenn ar ganol. Asantet ez eus bet gant ar Stadoù-Unanet da zilezel o galloud er c'hornad dre sinañ e 1977 an emglevioù Carter-Torrijos. E-keit-se e vez studiet raktresoù kanolioù nevez er Strizh-Douar gant ar broioù amezek. Emañ ar c'henwerzh etre an daou veurvor o tastum un nerzh re greñv evit ar ganol evel m'emañ hiziv an deiz. Anat eo ne vo ket ur Stad bihan evel Republik Panama evit taliñ ouzh an dispign a vo ezhomm evit doareañ he c'hanol.

D'an 28 a viz Du 1821 e vo embannet gant tud proviñs Panama ne oant mui diwar-neuze sujidi roue Bro-Spagn, hag o c'hoant bezañ keodedourien eus Stad Republikan Kolombia. Bodel e voe e Panama e 1826 ar c'heñtañ kendalc'h panamerikan gant Bolívar. Evit penn ar stourm didrevadenniñ, e oa tonket keoded ar Strizh-Douar da vezañ kêrbenn ar bed pa oa lec'hiet brav evit kemerout ur perzh eus ar brasañ er c'henwerzh etre an daou veurvor.

Ne baouezas ket goude ar varc'hadourien a oa e penn an traoù e Panama da rebech da Vogota he diouer a youl evit ober un implij kenwerzhel kreñv eus ar Strizh-Douar. Meur a wech e klaskas Panama terriñ he liammoù gant ur Republik a veze re feulz ar vuhez politikel enni evit reiñ ul lusk stabil d'an aferioù.

Youlekoç'h e teuas ar stourm evit sevel ur Stad distag pa voe dastumet un nerzh kreñv gant ar c'henwerzh etrevroadel dre implij al listri dre dan. Anatoç'h e teue neuze da vourc'hizien ar Strizh-Douar, e c'hellent ober ur vro binvidik-mor eus o hini dre gleuziñ ar ganol.

Roet e voe e 1875 gant Bogota d'ar C'hal-laoued, an aotre da gleuziñ ar ganol-se. Fiziet e voe ar chanter e Ferdinand De Lesseps, un ijinoar a oa bet dastumet brud gantañ dre zont a-benn da lakaat da gleuziñ kanol Suez. Ne voe ket muzuliet mat gantañ kudennoù ar raktres hag ober a reas freuz-stal evit bezañ dalet da gemerout an divizoù ret.

E 1903 e roas gouarnamant Kolombia an aotre d'ur gompagnunehz amerikan da zigeriñ adarre ar chanter. Ur zonenn a oa da vezañ fiziet enni evit kant vloaz. Nepell war-lerc'h e savas ar braz eus kannaded ar Republik suamerikan a-enep d'an emglev-se ha ne c'helle ket hervez al lezenn bezañ gwiriekaet hep o asant. Un torfed e oa hervezoù o riegzh broadel. Re vras e oa an ezhomm eus ar ganol evit ar Stadoù-Unanet. Broudañ a reas neuze Washington, poblañs Panama da embann o dizalc'h. Ne oa ket Bogota evit taliñ ouzh nerzh brezelien an Amerikaned ha kollet e voe ganti ar Strizh-Douar.

### LEZENN AR VRO GREÑVAÑ


Sinet e voe un emglev etre ar republik

nevez savet hag ar Stadoù-Unanet. Feurmet e voe zonenn ar ganol da gleuziñ da viken d'an Amerikaned. Ober a rafent al lezenn enni e-giz ma vefent en o bro.

Gloazet e oa emloc'h tud Panama gant un hevelep emglev. Ne oant ket koulskoude kreñv a-walc'h evit kinnig unan all d'ar Stadoù-Unanet.

Padout a reas al labourioù eus 1904 da 1914. Dont a reas zonenn ar Ganol da vezañ un enezenn a binvidigezh e-kreiz ur mor a baourentez. Un afer frouezhuz meurbet e voe evit ar Stadoù-Unanet. Abaoe ar bloavezhioù hanter-kant e vez feurmet ar zonenn 1 930 000 dollar ganto endra ma tastumet bep bloaz 55 milion a zollaroù dre werzhañ treizh-wirioù. Div wech eo bet peurbadet ar c'hospital postet.

Ne baouezas ket Stad Panama da c'hou-lenn diskar emglev feukus 1903. Efedusoc'h e teuas ar stourm diplomatek da vezañ pa zegemeras ar Stad vihan, harp ar braz eus izili Aozadur ar Broadoù-Unanet. E 1974 e c'hoarvezas an trec'h kentañ war hent an adperc'hemañ. Asantiñ a reas ar Stadoù-Unanet da zverkañ en emglev o gwir da chom da viken e



penn zonenn ar Ganol. Ret vo gortoz done-digezh Carter en Ti Gwenn, evit ma vefe kavet un diskoulm dereat d'ar gudenn. Diskaret e voe emglev 1903 gant reoù nevez, an emglevioù Torrijos-Carter.

### O C'HORTOZ 1999

Fiziet eo bet en un den eus ar vro, ar garg uhelañ er Panama Canal Commission, ar C'huzul stummet evit ober war-dro an treuzfurmadr melestradurel a zo da vezañ sevenet a-bazennoù. Evit ar wech kentañ en istor ar Stadoù-Unanet ez eus bet lakaet un estren e penn unan eus o aozadurioù. Un hevelep darvoud a zlefe diskouez n'emañ ket Washington gant ar soñj c'hoari un dro gann d'ar Republik bihan. Koulskoude e ranko houmañ hervez an emglevioù sinet e 1977, degemerout digant ar Stadoù-Unanet, ar c'hapital a vo ezhomm evit ledanaat ha modernaat ar ganol. Ne vo ket neuze evit mestroniañ dazont he mad nevez gounezet. Lakaet e vo ouzhpenn-se ivez, hervez an emglevioù-se, da zoujañ d'un neptuegezh a radio anezhi da lezel an holl vroioù da implij ar ganol. Ma tiviz ar gouarnamant Panama

dinac'h an emglevioù-se, e vo aotreet ar Stadoù-Unanet da ziskenn soudarded war-lec'h evit lakaat an traoù en o urzh.

### DAZONT AR GANOL

Re strizh eo deut ar ganol da vezañ evit respont d'ar goullenn war tachenñ an transportoù war vor hag evit degemerout an eoullistri bras. 11 707 batimant a zo tremenet drezi e 1983, 15 135 e 1995. Ezhomm a vefe da gleuziñ donoc'h evit gellout ober hep skleuzioù a-benn lakaat ar batimantoù da dremen buanoc'h ha degemerout reoù hiroc'h.

Klask a ra broioù all er biojoù, tennañ o mad eus kresk an transportoù. Emañ Nikaragwa ha Kolombia o kinnig sevel o c'hanolioù dezho. Emsavoç'h e vefe koulskoude modernaat kanol Panama eget kleuziñ reoù all. 80 Km hed a zo ganti endra ma vefe 275 Km gant hini Nikaragwa ha 165 Km gant hini Kolombia. Aet anat dezho ne vefe ket o bro evit kas da benn un hevelep chanter, ez eus bet dibabet, neuze 'zo, gant ar Golombiz, un eil raktres evit kemerout perzh er c'henwerzh etre an daou veurvor. Savet e vo un hent-

houarn etre an daou borzh. Un hevelep dibab a c'helle bezañ graet ivez gant Nikaragwa. Koustañ a rafe eno un hent-houarn etre 1500 ha 2000 milion a zollaroù hervez an dud lakaet da studiañ ar raktres. Dek gwech keroc'h e vefe kleuziñ ar ganol. Terriñ a rafe gwelloc'h koulskoude ar ganol-se, ezhommoù ar c'henwerzh war vor er c'hantvedoù a zeu. Postourien eus Japan a vefe prest da bourchas ar c'hapital a zo ezhomm evit digeriñ ar chanter-se, daoust m'emañ o bro o kenlabourat gant an Amerikaned evit prentiñ dazont kanol Panama. Peadra a zo da soñjal koulskoude e raio ar Stadoù-Unanet, o seizh gwellañ evit mirout ouzh ur vro all da gleuziñ un eil kanol a c'helle nozaout ouzh talvoudegezh ekonomikel o postadurioù e Panama.

Paol ar Meur

## Poblañs ar bed

Emañ kresk ar poblañs o koll lusk er bed hervez un enklask kaset da benn gant Aozadur ar Broadoù-Unanet. Beze' e vo e 2050, 500 milion nebeutoc'h a dud o vevañ war an douar eget ar pezh a oa bet rakjedet e 1994. Emañ feur ar frouezhusted o tigrisekiñ buan er broioù war hent an diorren. Peadra a zo da soñjal n'eo ket echu gant an omdroard-se. 75 milion eus ar 175 milion a vugale ganet bep bloaz ne vefent ket c'hoantaet, ar pezh a dalvez kement ha kresk bloaziek poblañs ar bed. Stabi e chomfe neuze ar poblañs-se ma vefe an holl evit mestroniañ o frouezhusted.

E-keit-se n'emañ ket an dienez o kilañ, na tost. 1,3 miliard a dud a rank bevañ gant ur c'horvodur na dizh ket un dollar bemdez ha 800 milion ne vezont ket evit termiñ o naon. Bras eo ar baourentez en Azia, dreist-holl e kreisteiz ar c'hevandir, hag en Afrika issac'harael. Ma kendalc'h an traoù e-giz-se e vo an hanter eus poblañs ar bed o c'houzvat an dienez er bloaz 2000.

Paol ar Meur



BRO IRAN

Merc'hed en arvar eus o buhez. Goude ar pezh a zo c'hoarvezet en Afganistan, bremañ dindan yev an d-talibaned, ez eo tro an Iran da vont da heul evit a sell ouzh stad ar merc'hed. Embannet en deus ar gouarnamant ev ret doujañ muioc'h d'ar reolennoù bet lakaet e pleustr abaoe dispac'h islamek 1979. Hiviziken ez eo ret d'ar merc'hed gwiskañ an tchador du, ar vantell hag ar saozenn dindan boan a dell-gastiz. Abaoe un toullad sizhunvezhoù ez eo krog ar polis da herzel merc'hed na zuyont ket a-walc'h ouzh ar reolennoù-se. Pennoù an islam a c'houlenn groñs ivez ne vefe ket ne livet dremmou ar merc'hed na graet re gant ar ruz muzellou. En holl lec'hioù foran e vez goulennet digant ar baotred hag ar merc'hed dispertiañ ma n'eus tamm liamm koulblad pe tiegezh etreze. Setu 'ta penaos e vez adlakaet merc'hed an Iran war an hent mat : level ha sentin.



INDIA

Da geñver beaj rouanez Breizh-Veur da India da lidañ 50vet bloavezh an dizalc'hiezh e c'houlenn Jagmohan Singh ma c'houlenn Elizabeth 2 pardon an Indiz evit lazhadeg Amritsar, en Ebrel 1919. Niz un dispac'helour krouget gant ar polis saoz, ez embann Jagmohan Singh e rank ar rouanez kinnig em zigarziñ evit ar fizzioù kozh a-benn sevel un dazont splannoùc'h. E 1919 e tennas an arme saoz, diwar urzhioù ar Jeneral Dyer, war un gregorez tud bodet da lidañ gouel sikh Baisakhi. Lazhet e voe 379 a dud ha gloazet 2 000. Malañ a reas al lazhadeg-se o greun da emsaverion ar frankiz hag o sikour a reas da sevel Bhagat Singh ha da gas India war hent an dizalc'hiezh. H.K.

lakaat an IRA da ziskouez o youl vat da vont war-zu ar peoc'h en-dro. Bremañ emañ Sinn Fein da gemer perzh da vat en divizoù a vo dalc'het en-dro adal ar 15 Gwengolo e Stormont Castle. C'hoazh e oa bet digoret an nor dezho di antronz disklénadur arsav-tennañ an IRA. Aon o deus bremañ an unanourion ez afe ar pouez bras war-zu ar vroadelourion en divizoù da vezañ dalc'het war dazont Norziwerzhon. N'o deus ket da zibab koulskoude, rak n'emaint ket e-tailh da bouezañ kement war gouarnamant Tony Blair, ezhomm ma n'en deus ket hemañ eus mouezhoù an unanourion da gas e vernaadoù da benn e Parliament Londrez. Hag e-touez ar boblañ e hañval ar goañg hag ar saderonni ren. H.K.

STOURM MERC'HED ARGANISTAN

Gant strollad skozell merc'hed bro Roazhon ez eus bet aozet un emvod diwar-benn stad ha statud ar merc'hed en Afganistan hiziv an deiz, d'ar Gwener 20 a viz Mezheven. Bez' e oa deuet ur vezegezh bet eno a-gevret gant an aozadur an c'houarnamant etre ar 15/12 hag ar 15/01. Kaset he doa gant ur skind, a embannomp darnoù anezhañ, a-berzh ar gouarnamant islamek. Ar strollad en deus divizet kas lizhiri da gannaded ha prefed departamant Il-ha-Gwilen evit ma vefe diskoulmet kudenn Fauzia Atzali hag he merc'h o deus c'hoant mont da Aostralia. M.K.

YEZHOU BIHAN EN A.B.U.

Degemeret eo bet Burev Europat ar Yezhoù Implijet Nebeutoch e-touez an aozadurion zo e-barzh Kuzul Armerzhel ha Sokial Aozadur ar Broadoù Unanet. Ur roll kuzuliah hepken o deus an aozadurion-se en A.B.U. Met laouen eo bet sekretour meur ar Burev Europat evit ar Yezhoù Implijet Nebeutoch, an lwerzhonad Dónall o Riagáin, gant ar c'helou, ha lavaret a ra e c'hello e-giz-se ar Burev Europat kas pelloc'h war-raok statud kumuniezhioù yezhel bihan Europa, na vezont ket anavezet holl en o gwirion gant stadou Unaniezh Europa. E Burev Europat ar Yezhoù Implijet Nebeutoch emañ bodet difennereñ ar yezhoù hep stad evel ar brezhoneg ha yezhoù all ar C'hwec'hkorn. Dont a ra ar sez-se en A.B.U. da c'haredoniñ un tamm al labour don bet kaset war-raok gant ar Burev Europat abaoe 15 vloaz. I.K.

EUSKADI CHEKENNOU

Da lizhiri kaset gant Euskal Herran Euskeraz (kevredgezh heñval a-walc'h ouzh SAB e Breizh) ez eus bet respontet gant ar Banco de Bilbao, ar c'h-Crédit Mutuel, hag ar c'h-Crédit Agricole e Baiona e oant o vont da ginnig chekennoù euskarek a-benn miz Gwengolo 1997. Gwelet e vo bank al labour-douar oc'h ober an Euskadi evit un hanter departamant ar stiv ne ra ket e Breizh evit 5 departamant. M.K.

SKOLAJ OKITANEK

Da-geñver bodadeg veur ar c'h-'Calandretas', ar skolioù okitanek par d'ar skolioù Diwan, a oa bet dalc'het e miz Mezheven e Tolosa, e oa bet divizet lakaat digent ar skolioù okitanek kentañ en distro-skol-mañ. E 1980 e oa bet krouet ar skolioù-mamm okitanek kentañ ha betek-henn e oad chomet gant skolioù-mamm ha skolioù kentañ derez. Reizhpell o deus kavet emsaverion ar c'h-'Calandretas krouñ ur skol eil derez, evit reiñ an tu d'ar vugale skolet en okitaneg da gendrec'hel gant o studioù en o yezh. E Montpelhier e vo staliet ar skolioù okitanek kentañ, met a-benn un nebeud bloavezhioù e hellfe bezañ digoret re all e rannvroù all eus Okitania. Soñjal a c'heller ivez em lakay bremañ an «Deskadurezh Vroadel» da ginnig klasoù «diyehzek-okitaneg-gallec en he skolioù, ar pezh na oa ket betek-henn. Kement-se eo a c'hoarvezas e hanternoz Euskadi hag e Breizh. Ur mell pazenn war-raok eo digoradur skolioù okitanek Montpelhier eta ; arouezus eo ivez eus kresk ar c'h-'Calandretas dre vras. Tremen 1300 skoliad zo skolet enno bremañ, en 28 skol strewet dre Okitania a-bezh tra ma ne oa nemet war-dro 600 anezho pevar bloaz zo. Diastereira a vez a-wechoù gant lod eus ar skolioù-se, eveljust, evel ma c'hell bezañ gant Diwan e Breizh, rak tud zo ne blij ket dezho gwelet ar c'hresk-se. Un nebeud devezhoù a-raok bodadeg veur ar c'h-'Calandretas e oa bet ur c'helou mat koulskoude o tont eus Ministrerezh an Deskadurezh : asantet en doa hemañ sinañ an emglev gant ar c'h-'Calandretas evit arc'hantañ ar greizenn stummañ zo bremañ e Besiers evit danvez kelennerien ar skolioù okitanek hag ivez re ar skolioù brezhonek, katalanek hag euskarek. Anvet eo ez ofisiel «Institut Supérieur Privé des Langues de la République Française». Dalec't e oa bet an emglev-se gant ar vuezhiadeg hag ar c'h-hemm gouarnamant a oa bet a-raok an hañv, met a-benn ar fin eur disoc'het da benn.



MARV NEKEPELL

E penn kentañ miz Eost e oa deuet er-maez d'wezhañ niverenn ar gazetenn Nekepell. E-pad pevarek miz eo deuet er-maez sizhunieg krez Breizh, met diasoc'h-diasañ e tuere an traou da vezañ evit abaoe ur pennad. Ker e koust embann ur gazetenn 28 pajennad bep sizhun ha re vhan e oa niver ar gouarnamant evit gellout padout. Abaoe un nebeud mizvezhoù e klaske renereñ Nekepell kreskiñ an dachenn «gouere» gant ar gazetenn, evit kaout muioc'h a zarvez lennerien just a-walc'h, ha klasa a raent ivez kavout arc'hant da stankeñ an toull brasoc'h-brasañ a oa e budjed Nekepell. N'int ket deuet a-benn avañ, ken o deus ranket paouez ha serañ ar stal. Ha sevel a raent ar gouern : daoust na plas zo e Breizh evit ur gazetenn sizhuniek a fall dezhi bezañ dizalc'h d'ouzh ar pemdezegegi bras pe diouzh ar strolladour politik ?

AL LANV niv. 82

E niverenn Al Lanv miz Gouere e tistro P. an Habak war disoc'h ar vuezhiadeg er Stad C'hall. Evtañ n'eus nep dazont d'hor broad e skeud sklaas an triev. Da c'hortez ne c'heller «kontañ e gwirionez nemet war hor youl... da c'houm d'hor yezh ar gwir da vezañ war dachennou zo» emezañ c'hoach. Keveldourion Amrasate, istor ar gelaouenn SAV, un danevell diwar zorn Daniel Doujet pe bennadod skrivadurezh a ya d'ober peurast ar gelaouenn. (Al Lanv, 59 hent Kerdronoù Vihan, 29000 Kemper).

BREMAÑ miz Gouere 97

D'ar 17 a viz Gouere e oa erret ganimp, e burev Bremañ e Roazhon, ar gazetenn lakaet er post e Kemper d'an 11 a viz Gouere. C'hwec'h devezh evit mont eus Kemper da Roazhon eta. Markañ a respomp war folenn gas pep niverenn an deizad m'eo bet lakaet er post. Mar bez re a zale gant ho kazetenn, kasit kelou dimp... ha d'ar post. (ha na zisortit ket adkumantenn : 200 lur ar bloaz da gas da Vremañ, 8 straed Hoche, 35000 Roazhon).

CARN niv. 98

Gant ar gelaouenn Carn e vez embannet keleier eus an holl vroioù keltiek. En niverenn an hañv e c'halled lenn, el lodenn a denn da Vreizh, pennadour saoznek diwar-benn ar strollad P.O.B.L., ar stourm evit lakaat ar Stad C'hall da stanañ Karta Kuzul Europa evit ar

yezhoù, ar stourmadeg ouzh ur greizenn rakloer er Gorned. El lodennou a denn d'ar broioù all e tuere en-dro, metra a wech, war drouzwezh ar strollad morer ar vuezhiadeg er Rouantelezh-Unanet, ur pennad iwerzhonek dedennus zo diwar-benn statud ar gouezleg e Bro-Skos hag ad displegañ a ra Alan Heussif en un doare sklaer perak ne sell ket ar C'hwec'h Keltiek ouzh Galsia evel ur gveliek daoust ma c'heller kaout eskemmoù ha darempredoù talvoudus gant ar vro-se. (CARN, Y. Craff, 145 straed Talbodek, 29300 Bey).

BRETAGNE INFO

Peder sizhunvezh vakafoù o deus bet tud Bretagne Info. E dibenn miz Gouere e oa bet un niverenn devoch eget boaz, enni ur pennad hir diwar-benn «Ti Breizh» e Pariz zo ar paouez kuitaat al lec'h brav ma oa e-kichen gar Montparnasse da vont d'ul lec'h all, dibabet fall-tre gant Kengor Rannvroel an Dourtelezh (C.R.T.) eme azer ar pennad. E-keit-se ez eus bet digoret ul legati e Pariz gant gouarnamant Kumuniezh Euskadi, a lenner en ur pennad all. En ur pennad gallec e tispleg dimp Jañdo Robin e soñj war «steuñv Rektor Roazhon» hag ar brezhoneg en «Deskadurezh Vroadel» (s.e. pennad brezhonek Bremañ miz Gouere). Marzet e vo ez a lodenn ar brezhoneg war zisteraat : ur bann e brezhoneg hepken en niverenn-se (42) diwar 16 pajennad 4 bann enno. An niverenn gentañ war-lerc'h (43) a oa deuet er-maez e dibenn miz Eost. (Bretagne Info, BP 253, 29834 Karaez Cedex).

DOUARONIEZH BREIZH

Ekerzh Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegenien, dalc'het e Skaer e miz Gouere, e oa bet roet priz Roparz Hemon d'ul levr nevez deuet er-maez e Ti An Here, «Douaroniezh Breizh» e anv. Evit e veistroec'h er skol-veur en doa Gwennole Bhaning, zo kelenner e skolioù-hag Roparz Hemon er Releg Kerhuon, dibabet sevel un domlevr douaroniek e brezhoneg, ha kinniget en doa eo da An Here e embann. Ul levr kaer an hani eo d'evit lodenn, an eil diwar-benn ar vro hag eben a-zivout armerzh Breizh. An doare kinnig, sklaer ha resis, a zegas soñj eus levrion Skol Vreizh gant a leun m'eo a luc'hkeudennou, a dresadennoù, a gartennoù. Plijout a ray emichañs d'ar skoliadoù ha d'ar gelennerien, koulz ha d'an dud deuet dre vras m'o deus c'hoant anavezout gwelec'h douaroniezh ar vro, dre ar brezhoneg. Ne oa bet embannet betek-henn nemet ul levr brezhonek diwar-benn an dachenn-se, «Douaroniezh Breizh», savet gant P. Flatres hag embannet gant Studi. Sklaer ha resis eo ar c'hwec'hon implijet, hag e dibenn al levr e kavaer ur roll eus ar genoù teknikel pe divoaz displeget e brezhoneg. (Douaroniezh Breizh, 130 lur an tamm, An Here, straed Gay-Lussac, Kergleuz, 29480 Ar Releg-Kerhuon)

**Embann**

**BLOAZIATAER TI AR VRO**

Gant Ti ar Vro, e Kemper, ez eus bet embannet ul levrig anvet «ar bloaziataer», a gaver ennañ anvioù ha chomlec'hioù an holl gevredigezhioù a gemer perzh e Ti ar Vro : bagadoù, lazou-kanañ, kelc'hioù keltek, aozennoù gouelioù, skolioù brezhonek, tiez-embann, gouerenennoù, hag all. Er c'hevredad Ti ar Vro e kaver bremañ 29 c'hevredigezh a ra holl war-dro sevenadur Breizh e mod pe vod. Evit an dud zo o chom e korn-bro Kemper e vo prizus ar «bloaziataer»-mañ ma kavint ditouroù a bep seurt diwar-benn yezh ha sevenadur ar vro hag o difennerezh. Kinniget brav eo ar bloaziataer hag ar vrezhonegerien a c'hello ober o mad anezhañ kenkouz hag ar c'hallegerien p'eo bet embannet en div yezh, penn da benn. Betek pennad digenit ar maer, B. Poignant, a c'heller lenn e brezhoneg, gant frazennnoù evel «a-walc'h er skridoù brezhonek evel «hengoù ar c'hreznennañ en hor bro...». Ar bras eus an embannoù brederiezh a gaver di levrig zo en div yezh ivez. Goude hemañnoù da dud Ti ar Vro (Ti ar Vro, 2-4 straed Jakez Karter, 29000 Kemper, pgr 02 98 90 70 43).

**BRETAGNE VERTE niv. 27**

Kelc'hizher an dilennidi «glas» e Kuzul Rannvro Breizh eo «Bretagne Verte». E niverenn miz Gouere 1997 (niv. 27) e oa ur pennad-stur diwar-benn mont er-dro ar Chuzul Rannvro, evel ma vez kaset war-raok gant e breizdiant. Hag en ur pennad all e lenned ivez «Il y a urgence à construire une véritable politique régionale pour l'avenir de la Bretagne» (=tremen poent eo sevel ur gwir bolitikezh rannvroel evit amzer da zont Breizh). Pennadoù dedennus all a oa diwar-benn an T.G.V. e Breizh, diwar-benn an tiez-gwer hag an endro. En niverenn-se ivez e adkaver testenn ar mennad votel gant ar guzulierien rannvroel diwar-benn adunvanidigezh departamantoù Breizh, hep an disterañ ad displeg, ken ne ouzer ket petra eo soñj strollad ar Re C'hlav war an divod... (Bretagne Verte, 19 straed Salomon de Brosse, 35000 Roazhon).

**DREMMWEL BREIZH niv. 16**

Er gelaoenn Dremmwel Breizh/Horizons Bretons e kaver evel boaz kelc'hoù ar vrezhonegerien. En niverenn-mañ e kaver ivez pennadoù diwar-benn Gouel Sant Erwan evel ma voe lidet e Pariz hag e Roma, ur pennad diwar-benn diaspora an Akadianed hag ar c'hendalc'h etrebroadel a vo aozet ganto e Louisiana e miz Eost 1999, ur pennad-kaoz gant A. Tamez zo Rener Terkerezh an tirad el Liger-Atlantel,

hag ar pennadoù boas (monsizonezh, levrioù, pladennoù, Emvod Breizh ar Bed...). (Dremmwel Breizh, 10 niverenn ar bloaz, 106 chemin de la Côte du Moulin, 78620 L'Etang-la-Ville, Bro-C'hall).

**LE COURRIER DE L'UNITÉ Gouere 1997**

Gant kannadig ar C'homite evit Adunvanidigezh Velestradurel Breizh (C.U.A.B.) e c'heller kaout keleier eus ar stourm evit adunvaniñ pemp departamant hor bro. En niverenn-mañ e kaver testenn un trakt bet skignet gant ar c'h-CUAB e-touez al labourerien-douar a gemer perzh e «Terres en fête-Pays de Loire», ur foar vras evit kas war-raok al labour-douar aozet gant ar sindikad F.R.S.E.A., ur pennad diwar-benn «Produit en Bretagne» a gas war-raok marchadurezhioù gant er pemp departamant ha keleier berr niverus. Evit skoazellañ stourmad ar c'h-CUAB ezhomm skoazell zo ! - hag evit kaout keleier na vezont ket skignet a-dreuz an harzoù zo etre al Liger-Atlantel ha Rannvro Roazhon, e c'helli komanantañ d'ar c'h-Courrier de l'Unité hag emzelañ d'ar c'h-CUAB (70 lur ar skodenn, CUAB, 3 straed Harouys, 44000 Naoned).

**MUSIQUE BRETONNE Gouere-Eost 1997**

Sed amañ un niverenn all eus Musique Bretonne, an he stumm nevez. Estreget an embannoù o tennañ da ouelioù an hañv - zo dispredet bremañ - e ranker menegiñ daou bennad-kaoz dedennus : an eil gant Yann Gwazdour, rener Coop Breizh, hag egile gant Albert Poullan, ar c'honter eus bro Redon. (Musique Bretonne, Dastum, 16 rue de la Santé, 35000 Roazhon).

**LES BONNETS ROUGES Gouere 1997**

E niverenn 7 kannadig ar strollad Frankiz Breizh e c'helle lenn ur pennad dedennus-tre diwar-benn istor Diwan kontet gant Reun an Ostiz, bet prezidant ar gevredigezh e-pad meur a vloaz. Er pennad-se e tesker da skouer e oa bet sikouret Diwan gant A. Gouvennig e 1978. Gant Frankiz Breizh ivez ez eus bet embannet peginoù a lenner warno «E brezhoneg, mar plij !», da vezañ peget war ar skridoù pe ar panelloù gallek en em gavomp ganto, a c'heller prenañ a-vras digant F.B. (Frankiz Breizh, 46 straed Branda, 29200 Brest).

**UR VOUTAILH WAR AN TRAEZH**

Ul levr bihan (52 pajenn) gant 12 danevell berr-berr diembann (nemet lod a zo bet gallet lenn war Gervarker) skrivet gant Romuald Texier ha Mark Kerran evit deraouidi (bloavezh kentañ) kentelioù Sav-Heol e Roazhon. Al levrig kentañ da reiñ da lenn da vrezhonegerien vras. Notennoù yezh ha geriaoueg zo e fin al levr. 30 lur hep ar mizou-kas. Da c'houlenn digant Sav-Heol, 42 straed al liru, 35 136 SANT JAKEZ.

**PRIZIOÙ**

E Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien, dalc'het e Skaer e miz Gouere, e oa bet roet prizioù d'un nebeud skridoù brezhonek. Roet e oa bet Priz Roparz Hemon da Wenole Bihanig evit al levr «Douaroniezh Breizh» embannet gant An Here. Gant Alan Botrel (kelennor ha barzh)



Liseanez Diwan deuet da resev priz Garedon Marcharid Gourlaouen


e oa aet Priz Langleiz evit loreañ hollad e oberenn (barzhonegoù ha troidigezhioù). Ha gant skolidi kentañ klas lise Diwan e oa aet Garedon Marcharid Gourlaouen, zo graet evit ar skridoù savet gant tud yaouank, evit o romant berr savet a-stroll «An hunvre dihan».

**Diskouezadeg livadurioù**

Setu bremañ pell 'zo e felle d'an arzoù, Armel ar Sec'h, kinnig un diskouezadeg livadurioù hag a ziskouezfe awen nerzhus ar Vretoned. Pedet eo bet gant Kef Kengredit Breizh e Roazhon da stallañ an taolenn gant tri arzoù all, kizellerien ampart, Alan Gicquel, Roger Jomcourt ha Annie Roudault-Fuech. Divyezhek eo an diskouezadeg a vo kinniget deoc'h adalek miz Gwengolo 97. Tal kichen an taolennoù e kavot barzhonegoù ha testennou skrivagnerien Breizh ha tramor. Al lid digoradur a vo d'ar Yaou 11 a viz Gwengolo e sal diskouezadegou CMB, bal Tour d'Auvergne.

**Gerioù-kroaz**

gant Mich Beyer  
Kael 49



**Termenadurioù :**

- A-led :**  
I - N'eo ket ul loudourenn, a dra sur.  
II - N'eo ket naet; ouzhpenn gwalc'h; meur a liv o nijal.  
III - Roue Kozh; 'pezh a ranker ober gant ul labour boul'het.  
IV - Gwezenn; rannig evit un anv-gwan.  
V - Sant a Normandi; ne vez ket lipet gant ar mezvier.  
VI - Da firval e lakae; gwelet er meleuzour.  
VII - Skrivagner; touet.  
VIII - Douger kermiel; goudor ar manac'h.  
IX - Kaouledet; rouantelezh ar gaoouenn.  
X - Dastum peadra da c'hwezhañ an tan.

**A-serzh :**

- 1- Meur a droad o skeiñ an douar.
- 2- Ur c'hevren eo re Mab-Den.
- 3- Dibenn verb; digare.
- 4- Skant hag angelloù; pelloc'h eget amañ.
- 5- Evel soubenn gozh e raes.
- 6- Diaezamant ne ray ket; lost avank.
- 7- Urzh da urzhiañ.
- 8- Chikaner; lec'h an dalc'h.
- 9- Persia gozh; Warno e sav ar c'hilhog.
- 10- Den e garabinenn evit Hugo ha Brassens.

**Diskoulmoù gerioù-kroaz kael 48**

- A-led :**  
I- Mederien; Asantadegoù.  
II- Abadennoù; tre; trouar.  
III- Tekenned; aros; regez.  
IV- Atañ; bezrouanezed.  
V- E-mesk; benede; eno.  
VI- Alister; Laez; genou.  
VII- Sezo; De villiers; anav.  
VIII- En; roez; lenn; eleze.  
IX- Nri; bazhatier; tomatéz.  
X- Nenn; imwez; Lan; te.  
XI- Enoe; doan; izella.  
XII- Un; run; ae; lir; ker.  
XIII- Ehanou; Kernevegerien.  
XIV- nousep; salduo.  
XV- En tu-mañ d'an ifern;  
XVI- Dae; Ev; Leve; etre  
XVII- Plant; mizez; iline.  
XVIII- Elena; eonenn; Golan.  
XIX- Aezamantou;  
Oufougoù. XX- Ezhommoù; rouler; gour.

**A-serzh :**

- 1- Matarasennerezed; eae.
- 2- Ebet; lennen; naplez.
- 3- Dakariz; rouantelezh.
- 4- Eden; sorbienoù; anao.
- 5- Rentel; oan; Oum (Khaosm); namm. 6- Inn; medez; drusaet; am.
- 7- Eneberzhioù; PNV; eno.
- 8- Nodas; Avanked; dotu.
- 9- Sklintin; e-tal; no. 10- Ar; al; an ar; nemeur.
- 11- Strobellenen; ivin.
- 12- Arouezierez; elfennoù.
- 13- Nesañ; en, velv (viev); eoul.
- 14- Neurti; liesrez; fe (feiz).
- 15- Alred; elgant; gor.
- 16- Drazoz; oman (name); el; Riou. 17- Eoge; ealan; krugellig.
- 18- Goedenned; keide; lago.
- 19- Ouz; noazet; reolennoù.
- 20- Ur; gouezet; nul; ur.

**Diskoulmoù gerioù kroazig niv. 190/191**

- 1- Fakas - 2- Talarat
- 3- Kanañ - 4- Manvad
- 5- Nabañ - I- Pakan
- II- Malanad - III- Kanab
- IV- Taravat - V- Sanab

**PRIZ LENNEGEL**

Da gaver Gouel ar Vuhez, d'ar 14, 15, 16 a viz Du 1997, ez eo aozet ur genstrivadeg danevelloù gallek ha brezhoneg gant Ti-Kêr Gwened. 1500 lur a vo roet d'ar priz kentañ hag ur priz ispisial «klas divyezhek» a vo ivez. A-benn 15 a viz Here e ranker kas ar skridoù da di-kêr Gwened. Evit gouzout hiroc'h pellgomz d'an niverenn 02 97 01 81 00.

**Nevez Navy safe un alarm didrouz evit ar bagoù**

*Objin, ur gompagnonezh eus Naoned he deus kroet ar sisten pelldiwallerezh kentañ evit ar bagoù.*



Navy Safe a zo ur vouest a vez lakae e-barzh ar vag ha liammet kenenn a ra an ti porzh, pa vez digoret dorioù pe brenestroù ar vag hep ober ar c'hod, ha pa vez torret ar sisten Navy Safe. Urzhiataerzh an ti porzh a zo liammet ouz servij ar pelldiwallerezh dre ar pellgomz, kemennet e vez diouzhtu tud ar servij pelldiwallerezh evit mont war vourzh.

**Gant Navy Safe e c'hellit laoskal ho bag er porzh hep soursial.**

**Evit gouzout hiroc'h diwar benn Navy Safe :**

**Objin,**  
Arlaneg - BP 30746,  
44307 Naoned Cedex 3  
pgr. 02 40 18 06 18  
pgr. 02 40 25 26 49  
Internet - <http://www.objin.com>

**Amzer Nevez Soe 56270 Plañvour • Pgr : 02.97.86.32.08.**

**Kentelioù brezhoneg :** 5 live  
**Kentelioù sonerezh :**  
- Akordeoñs, bombard, binou kozh, binou bras, telemn dre stumm stalioù labour hinienel.  
- Kentel sonerezh evit ar sonerien daou-ha-daou.  
- Bombard, binou, tamboulin evit krouñ bagad Plañvour.  
- Dizolioñ ar sonerezh  
**Livañ war ar vouloùz,** c'hoariva, bagad sonerien an Oriant, kentel tresadennoù keltek.  
**Mediaoueg keltek :**  
3500 levr ha CD diwar-benn Breizh e brezhoneg hag e gallek.

**Stajoù sonerezh, evit sonerien ampart :**

16 a viz Du 97, 18 a viz Gwener 98, 08 a viz Meurzh 98.  
- Akordeoñs gant : R. Robert, J. Beauchamp, Y.F. Penroches.



- Bombard-binou kozh gant : Y. Bihan, E. Olu, A. Meut.
- Fleut a dreuz e koad gant : Y. Alory, S. Morvan, H. Guillo.
- Gitar gant : N. Kemener, Y. Ribis, Y. Riou.
- Viololoñs gant : Ch. Lemaître, P. Lamou, D. Trichet.

**Prezegennoù**  
11/10/97 Loeiz Herveu gant Daniel Carré (e Brezhoneg).  
15/10/97 An anvioù familh gant Gwenole ar Menn (e gallek).

**Festoù-noz ha abadennoù**  
20/09/97 Fest-noz gant Int. Gouzel - 04/10/97 Fest-noz gant Storvan, Kurun, Baron/Annez, Jago/Quéré - 22/11/97 Sonadeg gant Ortolan ha Meskal Band - Fest-noz gant Skolvan ha sonerien.

**Stajoù all**  
Kan, dats, sonerezh gant ar c'hevredigezhioù ezel, diwar stummoù stajoù eus 1/2 devezh da 4 devezh.



## Reuz e Brest

Penaos e voe kroget gant ar reuz e Brest ? Abaoe ur pennad e oa tud ar vro oc'h ober anaoudegezh en-dro gant o sevenadur. War dachenn ar brezhoneg, al lennegezh hag an embann, ar c'hoariva, an dañsoù, ar sonerezh e oa Bro-Leon o virviñ. Ezhomm e oa da vodañ an holl re a rae war-dro ar vuhez vreizhek er c'horn-bro, hag evit-se e voe krouet SKED.

Kinnig a ra SKED un ti digor da holl ar re o deus c'hoant da c'houzout hiroc'h diwar-benn danvez Breizh. Un ti degemerus eo, e-lec'h ma vez aozet a bep seurt abadennoù. Un emglev eo ivez, gant 33 c'hevredigezh a labour asambles, hag a vez roet dezho muioc'h a nerzh dre labouraat a-gevret.

War dachenn ar sonerezh neuze, e oa Bro-Leon o vont war-raok ivez, koulz war ar maez hag e kêr-benn breizh izel. Goude an trouz a voe klevet da gentañ ar bloavezhioù 70 e oa deuet da vezañ niverusoc'h niverusañ an abadennoù a denne d'ar vuhez vreizhek, ha d'ar sonerezh da gentañ. Strolladoù '70 a zo ganet d'ar mare-se, re all a zo diwanet e-kerzh ar bloavezhioù 80, ha nevesoc'h '20, ez eus deuet ur rummad all da lakaat buhez e festoù-noz ar vro.

Eus an tri rummad-se e vo kavet war ar bladenn-mañ. Ar sonerien eo o deus bet c'hoant da ginnig deoc'h ur fest-noz heñvel ouzh ar re a vez graet e Brest, gant kanerien, sonerien daou-ha-daou ha strolladoù, evit reiñ ur skeudenn damwir eus un nozvezh enlaket war ul leurenn eus Bro-Leon. Gwelet ho peus anezho o seniñ dirazoc'h, kasit anezho holl ganeoc'h d'ar gêr. Gwell 'vo deoc'h el lavarout d'an amezeien en a-raok, pe c'hoazh pediñ anezho da gemerout perzh : reuz a vo !

Sked - Ti ar Brezhoneg ha Sevenadur ar Vro - 18, straed Duguay Trouin 29200 Brest.

Pgz : 02 98 80 26 71

Plr : 02 98 44 36 97

Minitel : 3614 BRESTEL - Alc'h : SKD

Reuz e Brest (Reuz a Brest Mêm)

Pladenn-arc'hant gant sonerezh breizhek da zañsal. Kaset da benn gant EOG Production gant sikour SKED.

Deuet er maez d'ar 17 a viz Mezheven 1997

## Troiad KERN

Pelec'h an diaoul vo tu da glevet mouezh flour ha kevrinus Kristen Nikolaz ?

E miz Gwengolo, d'ar Sadorn 13 e kêrig Landelo. Ar sonadeg a vo e Presbital kozh Landelo.

E miz Here, d'ar Sadorn 4 e sal ar Mission Bretonne, e Pariz (Bro-C'hall), d'ar




Merc'her 8 e-pad fest Celtomania e Naoned, e sal ar Paddy Pub, ha d'ar Gwener 10 e-kichen Pariz, e kêr Bagnolet. Aozet gant DECLIC Bretagne

02 40 46 60 64 - Patricia Teglia

## Yann-Fanch Kemener

N'eo ket echu troiad hañv Yann-Fanch Kemener, tu vo d'e glevet d'ar Sul 21 a viz Gwengolo e kêr Perros (bro-Dreger) gant ar barzh Yvon le Menn.



E miz Here : e bro Polonia, hag e miz Du e bro Kanada. Tu vo d'e glevet war gwa-gennoù Radio-Frañs d'ar Gwener 3 a viz Here.

## Red Cardell

Ur bladenn arc'hant nevez a vo kinniget gant ar strollad RED CARDELL, sellit mat ouzh ho poest-lizhiri, marteze e vlot e-touez an dud dibabet ! Dont a raio er-maez da vat d'an 3 a viz Here, ha hervez ar bro-duktourien e vefe degouezh brasañ an distro-skol : ur bladenn rock a-zoare, a raio trouz (...), kempennet gant ur ski-pailh eus ar re wellañ e Breizh.

Brudañ ha skignañ gant «N Less» - Pgz 02 99 14 41 00

## Fest noz

### Gant ar strollad Amnesty International

a vo d'an 13 a viz Gwengolo 1997 (9 eur noz), e sal «An Tok Ruz», e Kemper. Kaset e vo en-dro gant : Skolvan, Kaol Kozh, Breudeur Kere.

### Gant SKED

a vo d'ar Sadorn 20 a viz Gwengolo e Brest evit an distro-skol. Kavet e vo er fest noz-mañ holl sonerien ha kanerien ar bladenn «Reuz e Brest mêm» . Pedet oc'h da zont niverus gant kevredigezhioù Sked e ti-kêr Brest adalek 9e noz. Titour a vo roet deoc'h diwar-benn obererezhioù ar gengevredigezh.

### Bagad Sant Ewan-Bubri

Savet e vo ar bloaz-mañ un arvest gant ar c'helc'h «Bugale Mêlrant» d'ar Sadorn 27 a viz Gwengolo, 8e30 goude meren e Bubri. 10e gant : Kurun, Tan ba'n ti  
Sonerien ar vro : Ar gwenneg/Bauche  
Kanerien ar vro : Palarig/Kristen ...

### Evit an adkrog-skol evit skolaj Plijidi Diwan e Boskazoù

(Boqueho) d'ar Sadorn 27 a viz Gwengolo adalek 9 e noz.  
Kaset e vo an traoù gant : Pevar den, Chantous d'Loudia, Moal - Chaplain, Malrieux - Urvoy, Skolajidi Plijidi

## DEVEZHIOU AR GLAD E KARAEZ

Da-geñver Devezhioù ar Glad a vo d'ar sadorn 20 ha d'ar sul 21 a viz Gwengolo e vo kinniget da dud kornbro Karaez ober gwelloc'h anaoudegezh gant Rouedad Vreizh an hent-houarn. Ul lodenn eus istor kreiz ar vro, eus an dezougen hag an armerzh eno, a vo tu da anavezout gwelloc'h evel-se. Gant Reun an Hir, bet ijnour oc'h ober war-dro an dezougen hag aozer al levr brezhonek «Dre hent pe hent», e vo prezegennet, d'ar sadorn 20, e brezhoneg da 2 eur 30 hag e galleg da c'houde diwar-benn an hent-houarn e Breizh. Tu a vo ivez da welet un dis-kouezadeg diwar-benn Rouedad Vreizh hag ar «marc'h-du» nemetañ a chom er vro. Evit gouzout hiroc'h : CFTA  
Karaez, pgz 02 98 93 02 91.